

32 bajenn
evit an Hañv

borcenn

R6L
melen
du
glas
C -
(W.F.)

ant

en Europa

Iwerzhon e Douarnenez
SIDA : 5000 den tapet bemdez

E 1975 e voe savet Levravaeg Penn-ar-Bed hag abaoe ar mare-se ez eus bet pignet ur pemp kant (500) bennak levrioù brezhonek gant. Ur rouezh eo levlislocude pa vez klevet gant tud o c'h ober war-dro levravaegoù war ar maaz ne zou ket kalz a lennerien da gaout levrioù brezhonek a-lest. Ma vefe goulenet aliesoc'h anezho e vefe tu da gas e levravaeg pe levravaeg tiskid a bep seurt a-barz Levravaeg Penn-ar-Bed - (pe Aodoù an Arvor pe Morbihan).

Renner al Levravaeg Christian Rogel.

Kemennadenn digant levravaeg Penn-Ar-Bed

Lod eus ar vrezhonegerien a c'helle lenn muioc'h a lennegezh vrezhonek ma sonjant goulen digant levravaeg o c'humun e lodenn vrasañ Breizh.

Sur, ne c'hellfent ket kavout diouztu an holl ditloù deuet en o spered, mat bep trimitiad e vez prestet da gantadoù a levravaegoù un nebeudat levrioù brezhonek gant levravaegoù Kuzulioù meur Penn-Ar-Bed, Aodoù-an-Arvor ha Morbihan ha pap titl goulenet a vez klasket pe brenet ma vez tu.

E levravaeg Penn-ar-Bed ez eus bet pignet un hanter-miliad bennak a levrioù brezhonek (hep kontañ al levrioù evit ar vugala) hag e vefe tu d'o amprestñ aliesoc'h. M'emaoc'h o c'humun en unan eus tri departamant Breizh-Izel, goulenit titl pe ditl digant levravaeg ho kumun. E-mod-all, goulenit un hent pe an ali digant Renner Levravaeg Penn-ar-Bed.

Levravaeg Penn-ar-Bed 12 straed Turgot 29000 Kemper - Plig: 98.95.88.12 - Fax: 98.64.26.81. (ez ordinal, ne vez ket prestet levrioù e sez al levravaeg)

Lennet em eus e Bremañ (niv. miz Even, pajenn 7) ar respontoù graet gant R.P.R.-U.D.F. ouz S.A.B. : «Ar brezhoneg 'zo yezh ar vretonek... et n'a nul besoin d'un statut officiel qui n'autoriserait rien, à son existence et à son autorité». Ha respont a reont pelec'h ouz ar goulen digant diwar-benn an deskadurezh : «enseignement de la langue bretonne dans des classes spécialisées». Ne gomprenan ket mat gerioù ar bolitikoerien gall o komz diwar-benn Breizh. Daoust hag eo ar brezhoneg yezh ar Vretoned "spécialisés" a gomz brezhoneg hepken ? Hag ez eus Gallaoued "spécialisés" a gomz galleg, ha Gallaoued "non-spécialisés", na gomzont tamn galleg ebet ? Ilekis ! Luis Felip I Aoad Katalunia

Skrid-emglev Maastricht

Dañjer pe esper

Displeget en doa Christian Guyonvarc'h an deiz all e Pempoull penaos e oa tu da gompren petra oa dindan emglev Maastricht. Nebeut a dra da welet gant sevel un unvaniezh bennak a degasje ur wellaonn d'an dud ha d'ar broadoù bihan war-eeun, da baotred o arc'hant bras ne laran ket.

Tud a bep seurt a oa deut da Bempoull d'an 23 a viz Mezheven evit selabu C. Guyonvarc'h o komz diwar-bann skrid-emglev Maastricht. E parlamant Strasbourg e labour C. Guyonvarc'h, ezel eus U.D.B., evel marour ar strollad-deputeed europat "kanevedenn". Ha gouzout a-walc'h a ra hennezh, dre e vicher istorian, ar rag hag ar perag eus an doare ma oad en sell da sevel Europa a weler bremañ o tiffukañ, du war wenn, a-hed 250 pajennad ar skrid-emglev, bet nevez-sinet gant pennoù 12 stad eus Europa ar C'hornog.

Kemer merkoù a vez mat d'an nen ober pa vez kollet, a-hervez. Ha da welet, eme C. Guyonvarc'h, ne vez ket gwall aezet d'ar braz eus an dud ragwelet petra a vo eus Unvaniezh Europa. Erru eo poent bras en em soñjal eta hag esa kompren petra a dalv emglev Maastricht, bremañ pa 'z eus bet lakaet ur referendom d'an 20 a viz Gwengolo. Root e voe lañs kentañ Europa pemp bloaz hepken goude an eil brezel-bed, pa voe sinet ar feur-emglev kentañ war ar glac'h hag an dir gant ar Frañs, an Alamagn hag ar Beneluz. Ur gwir bolitikezh boutin a vez kaset abaoe 30 vloaz just, evit pezh a sell al labourerien-douar, moarvat abalamour ma c'hoantaed produñ boued a-walc'h evit ar marc'had diabarzh. Evit pezh ar basketaerien n'eus nemet abaoe 10 vloaz e vez pledet gante, dre gataoñ peurvuiañ.

J. Delors en e vutun

Gant an enkadenn-energiezh kentañ, e 1974, ec'h ae war vihanaat ar c'henwerzh-diabarzh er Gumuniezh Ekonomikel Europat, eus 62 % a-rack da 53 % e 1985, dres pan erruas J.

Delors e penn komision Brussel, gant ar soñj da abretaat kempenn ar marc'had unvan, ken e voe sinet gant an 12 stad a oa anezhe K.E.E. ar skrid a vez graet Akt Unvaniezh 1986 anezhañ, da bal dezhañ d'ober ur marc'had unvan gant an 12 stad adalek ar c'hentañ a viz Genver 1993, da laret, a-benn c'hwec'h miz amañ.

Lakaat bech a rae paotred Brussel, a-benn neuze, da unaniñ, par ma c'hallent, an doareoù-kenwerzh hag ar gwir-lezenniezh e K.E.E. . Tri c'hant lezenn "europat" bennak a zo bet aozet a-benn tostaat doareoù ar stadoù e pep keñver ekonomikel, war-bouez tachennoù zo. Dindan 2 % e ranko menel ar c'hemm etre T.W.D. (Taos War an Dalvoudegezh, "T.V.D.") an 12 stad, Lezenniezh a zo bet graet ivez, da skwer, war marc'had ar c'hanterioù publik, an asurañsoù, divigad ar budjedoù-stad ha kalz tachennoù all c'hoazh.

N'eo nemet a-benn 1994 pe 1995 e c'helle bezañ embannet an dekredoù da lakaat al lezennoù europat-se er pleustr. Rak-se, eme Christian Guyonvarc'h, e krogo, adalek penn-kentañ ar bloaz o tont, ul lajad dilezenn-kaer a defe diaesaat ha zoken skoilhañ ar c'henwerzh hag an eskemmoù a bep seurt da vezañ kasat etre 12 stad an Unvaniezh nevez, bat kumuniezh.

Mac'h a war stabiataat ar feurioù-eskemm, e c'hellje ur moneiz unvan, moneiz nemetañ eta, bezañ krouet adalek 1999, gant ma vo bet peurunanet doareoù pennañ ekonomiezh an 12 stad evel just, a-fet c'hwec'h talvoudegezh an arc'hant, ar budjed-stad dispignoù ar gwarez sosial.

Europa an digempouezioù



Un dañjer bras a c'hellje dont, gant an treut ma vano galloud gwirion pep stad evit mareañ he zra. Daoust ha ne vije ket troet stadoù 'zo da daihañ lip war o gwarez sosial a-benn dedennañ ar c'hapital gwelloc'h, abalamour d'ar c'hargoù ha d'ar paeoù disteroch ? Kompren kement-se diwar lenn testenn emglev Maastricht zo ur gwir labour intañvez, ken digempenn ha stambouc'het mac'h eo bet aozet ar skrid. Ober a ra meneg, kouz laret da bep mellad, eus feur-emglevioù bet sinet a-rack. N'eo ket re vraz ivez intent da vat ur c'halz eus ar frazennoù amjestr a gaver penn-da-benn d'ar skrid, yezh-koad an deknokratad evit ar braz anezhe. Navez-flamm eo pezh a denn d'an unvaniezh politikel avat. Kaoz a zo eus

un arme europat, na petra 'ta, diouzh ma c'heller kompren etre al linennoù. War sevel ur c'horf-arme gall-alamañ 35000 soudard ennañ emañ an div stad-penn eus K.E.E. evel ma ouzer. Arme Europa an 21vet kantved pe n'eo ket ? Diwar ar soñj da sevel ur marc'had boutin hag unvan e weler a-walc'h, eme C. Guyonvarc'h, penaos e pleger penna-da-benn da reolennoù sakr an ekonomiezh liberal a-benn em difenn ouz ar stadoù bras all, S.U.A. ha Japan. Gant an Unvaniezh, kreñvoc'h a se, e c'hellje bezañ an tu-gwir er brezel ekonomikel o c'h ober e reuz abaoe 15 vloaz, war an Douar. Pa c'hed eo, war meno C. Guyonvarc'h, ne welle ket mistri Europa an 12 sevel kempouezioù gwirion d'an dienez ha

d'ar baourantez a gresko c'hoazh diremed e-kerz ar reuziad-kreizennañ hag adstummañ a cheñcho dremm da veur a gom-bro en Europa, war-bouez pinvidikaat ar broioù pinvidikañ en ur ezhommekaot rankadoù-tud en o lezh ha broidi 'zo dre vilionoù. Ne gaver mann, a-dra sur, o tennañ da difenn ha diorren yezhoù ha sevenadurioù bihanañ Europa. Ankouast eo lip ar c'hempoueziañ a vije d'ober en Europa o tioreñ ar "Warez Atlantik". Tonket e vije Breizh da vevañ diwar arc'hant an douristed, plijet gante arvestiñ ouz ar gouerien diwezhañ o telc'h an da gempenn an natur, war o dilhad giz-kozh ■

Joel Donnart

Bulgaria

ZHEL'YU ZHEL'YU, Prezidant Bulgaria, zo bet skarzhet eus e rannid ... abalamour d'ul lezenn en doa-en lakaet da votifl

Ukraina

Abaoe 1989 ez eo an ukraineg yezh ofisiel nemet Ukraina hag ar skol-veur, al leziou-barn, ar gouarnamant h.a ... o daus etre 3 ha 10 vloaz da lakaat an dezv-se da dalvezout.

Paourentez e Kumuniezh Ekonomikel Europa

Un europad war c'hwec'h a zo paour. A zo gwashoc'h, unan war dri en Ulster. War washaat ec'h aje c'hoazh gant ar Marc'had Unvan.

E-kerz ar 5 bloaz diwezhañ e oa bet kaset 450 miliard a lurioù gall eus ar rannvroioù pinvidik d'ar re baour. Diouzh un tu eo bet koazhet an troc'h a oa etre live-bevañ an Alamagn ha lakomp hini ar Portugal. Diouzh un tu all ivez eo bet kresket an distag e pep bro etre ar binvidieñ hag ar beorien. E 1975 e oa 38,5 milion a beorien en Europa. Hiziv avat e vije etre 50 ha 55 milion anezhe, da laret eo, un europad war 6 pe 7. E bodad ar "G7" (stadoù pinvidikañ an Douar) ez eus 4 stad eus Europa, avat. Peseurt peorien 'zo ? 6 milion a dud dilabour abaoe pell, 1 milion a dud o vevañ dindan an amzer, 7 milion a dud ha n'int ket gouest da lenn na da skrivañ, etre holl 10 pe 12 milion a dud dilezet tonket da chom war o c'hemend-all a-hed o buhez, da laret eo, ar re baour e-touez ar re baourañ.

Mont a ray ar baourentez da get dre ma kresko madoù an ekonomiezh, a veze kredet gwechall. Er c'hontrefed, peorien nevez zo deuet pa diorroes stadoù Europa ar C'hornôg. Tud dilabour, mammoù en o unan ac'h a d'ober, hiziv, ur c'halz eus an ezhommeien : 15% eus ar boblañs en Europa, da laret eo, n'eo ken un nebeudig a bezhioù didalvez an hini eo.

Gonit diwar-goust an dud

Aezet a-walc'h eo kompren perak ez eus kemend all a dud dibourvez. Dre adframmañ o industriezhioù o deus ar Stadoù brasañ lakaet dic'hoprañ ur mor a dud, diaes-mat dezhe kavout ul labour all, panevet micherioù berpad ha war verr-dermen. Rak, en ur vodernaat an teknikoù produiñ evit talañ ouz ar c'hevezerzh (koñkurañs)

Pet a beorien gant an Daouzek

(braskontet) treuzoù an ezhommegezh : dindan 50 % eus al leve etraat broadel

Table with 3 columns: Country, millionou, % eus ar boblañs. Rows include Belgia, Danmark, RFA (Kornog), Izelvroioù, Itali, Frans, Breizh Veur, Gres, Spagn, Iwerzhon, Portugal, and Europa an 12.

Herve Kerrain

En tu all d'ar c'hleuz

gant Joel Donnart



Dionez evit ar re dilabour a-gozh

etrebroadel o deus-i ankouaet planedenn an holl labourerien a vije skarzhet.

D'an eil, n'eo ket ken barrek sistemoù ar gwarez sosial da vagañ kemend all a dud hag ar gouarnamantoù a zo douget da digreskiñ ar skoazell.

Ouzhpenn-se, ret eo lakaat e kont an doare mach' eo aet da get ar c'henskoazell a veze gwechall er familh ledan, er c'harter, er c'horn-bro pe er barrouz e-lec'h ma veze un nebeudig a du war ar bara. Pa 'n em gavont en o unan-kaer e sant re vat an ezhommeien nevez-se int bet lakaet er-maez a-fetepeañs-kaer.

N'ay an traoù nemet war washaat ma ne vez ket esaet diarbenn, gant nerzh, ar walenn o tont. Tarzhañ a c'hell ober ar gevredigezh dre forzh lezel a-gostez ul lodenn anezhi, an ezhommeien, dre diouer a arc'hant ha dre mach' ay da

netra gant ar renerien talvoudegezh ar c'henskoazell, koulz er barrouz evel er vro a-bezh.

Gant an didalvoud a santo an dud paoureaet en o c'hreiz, pellaet diouzh ar sevenadur-ren, e tarzho emsavioù, gant ar feulster, an dorfederezh, betek e kreiz-kreiz ar c'harioù brasañ, dre ar c'harterioù paour en-dro dazhe.

Diaes eo krediñ e vije ouzhpenn 20 % eus an dud hep labour en Iwerzhon. Aet eo ar postoù-labour nevez krouet gant ar re yaouankañ hag ar merched, o lezel a-gostez ar re dilabour a-gozh.

Kraizennañ an ekonomiezh e vo eled pennañ ar Marc'had Unvan. Broioù evel an Estramadura (Spagn), Tras-os-Montes (Portugal) pe Ulster (Iwerzhon) a chomo war-lec'h da viken, er bar da vroioù eus an Trede Bed.

Kêr o kouezhañ en he foull

Ur gêr-vras nevez eo Bownlow, en Ulster, 30 km eus Belfast. E 1960 e oa evel ur gêr-vras skwer, gant 11000 a dud o vevañ enni. Gwelet e veze e vije deut da vezañ eil kêr vrasañ Ulster. Uzin vras Goodyear avat a serras e 1983, ha kas kuit ganti ar binvidigezh diouzh Bownlow. Nabeutoc'h evit 1100 lur ac'ha a bep miz gant an hanter eus ar familhoù eno. Etre 30 ha 80 % emañ ar feur-dilabour hervez ar c'harterioù. N'o deus an div drederenn eus an dud dilabour tamm micher ebet ken.

Lakaet e oa bet ar programm "Paourentez 3" da dalvoue Bownlow, da bal dezhañ stourm ouz ar ezhommegezh. Diyalc'het e vo bet 55 milion a E.C.U. iou gant Brussel etre 1989 ha 1994 (39 ktraktes all a zo ar program-se). 2,2 milion a lurioù saoz a vo aet o sevel ur greizenn-stummañ war ar c'hompoderezh hag ur c'hleub-merc'hed, gant diwallerezhioù, ostaleri hag all.

Gant ar programm "Paourentez 4" e c'houlennet muioc'h c'hoazh. Abaoe, 1984 e ro K.E.E. etre 100 ha 150 milion a E.C.U. iou bep goañv evit bevañ ar re baourañ en Europa.

Pennoù-bras berrvel

"N'eus ket kalz traoù nevez da laret na da c'hortoz", eme J. Delors, e penn kentañ miz Ebrel, er c'heñver-se. Nemet ha kenlabourat a-dostoc'h gant ar c'hevredigezhioù e-maez Stad (KMS e galleg "ONG"). Mont etrezek ur seurt karta diwar-benn gwarez an ezhommeien evel ma oa bet graet evit al labourerien e 1989, sell aze a vije un dra vat. N'eus ket kalz fiziañs da vagañ e gwirionez rak ne faot ket d'ar stadoù (socialisted e penn lod anezhe !) plaññ da vat gant an denez na zoken gwelet pelec'h emañ an dalc'h. Nevez 'zo, e oa klasket disteraat pe mougañ ar gwir abeg d'ar reuz bet c'hoarvezet e Los Angeles ha karioù bras all eus ar Stadoù Unanet.

Kalz a vo da dirouestiañ ivez gant an divroadeoù diabarzh eus ar c'hornioù paourañ etrezek ar re binvidikañ. Ha stag e vo kement-se holl c'hoazh ouz ar baourentez hag an ezhommegezh e diavaez Europa an 12

Broadoù

Tro Europa gant Olier g/Kombod

Meur a bennad zo bet er mizioù tremenet e Bremañ diwar-benn kudenn ar broadoù en Europa. E-touez ar re ziwezhañ e c'heller menegiñ Yougoslavia-bet ha Tcheko-Slovakia. Ober tro ar c'hemandir a vo graet er pennad da heul, o chom a-sav er broioù ma c'hellfe emdreiñ buan an traoù er mizioù o tont.

Euzhslavia

A zeiz da zeiz e cheñch stad an traoù er pezh a oa Yougoslavia betek nevez zo. Mat e vefe adinn kazetennoù gall penn-kentañ ar bloaz. Faskourien a veza graet eus holl stourmerien Kroasia, da heul propaganda Serbia. Ken euzhus eo avat ar pezh zo bet graet gant ar bezañoù serb hag an arme gevreadel ma n'eus ket bet tu da bolitikourien ha da gefredounien Frañs kendalc'h ar guzhat ar wirionez. A-du emañ an holl bremañ war ur pal : diskar Milosevitch ar buanañ 'r gwellañ.

Diaes e vo diverkañ komzoù zo avat, diaes e vo ankounac'haat pegen drebiant eo chomet stadoù kornôg Europa. Skaer evel lagad an naer e oa an traoù koulskoude. Ken abred ha 1986 en devoa Milosevitch distaget ur brezegenn a embanne e oa dav stourm evit Serbia Veur, Serbia C'HLAN. Rakwelet e oa al lazhadegoù a-vremañ. Ret eo ober traoù ken euzhus ma tech'o ket ar Groatel hag ar Voslaked na vint ket bet lazhadeg.

Bez' e c'helle Europa lakaat un termen d'al lazhadeg, dre an nerzh. Peget a vo gortozet choazh ?

Slovakia

War-du an disrann ez eer buan e Tcheko-Slovakia. N'en deus ket gelllet Václav Havel bezañ adillennet da brezidant ar Stad kevreadel d'an 3 a viz Gouere. An tri strollad slovak zo savet a-enep. E-keit-se en deus Vladimir Meciar savet gouarnamant Slovakia. E strollad, an Emsav evit Slovakia Demokratel, en doa bet 38 % eus ar mouezhoù en dilennadegoù. Tri ministr hepken n'int ket eus e strollad en e gouarnamant avat. Hag evit ar wech

bremañ 130/131 - miz Gouere/Eost 1992

Kampou-bac'h kuzh

Kampou-bac'h kuzh a zo bet dizoloet e Yugoslavia gant kazetennerien. Digouzañvus klevet 'pezh a c'hoarvez eno. Kantadoù a verc'hed oadet etre 14 hag 20 vloaz, dalc'het dre ret ha gwashoc'h o stad eget c'hatal ; Profet emaint da soudarded Serbia ha graet ganto forzh petra. 40 anezho zo bet saveteet gant skoazell un nebeut tud eus al lec'h, haiget ma oant gant pezh a veze kontet. Stroñset da viken eo ar marc'hed yaouank, lod aet da sot da vat gant pezh o deus ranket gouzañv er c'hampou-se er mizioù tremenet ■



Lettonia - bech d'ar Rusianeg I

kentañ abaoe pell n'eus dileuriad abet evit ar bihanniver hungarat. Ne hañval ket ar pennadurezhioù slovak bezañ tuet da zoujañ kalz da wirioù an Hungariz o vevañ e su o Stad da zont...

Planedenn rust ha kalet ar Rusianed strewet

Goude diskar an Unaniezh Soviedel ez eo milionoù a Rusianed en em gav pell diouzh o mammvro e republikoù dizalc'h penn-da-benn. Ha bech a sav dre-holl. E Moldova eo krog ar brezel da vat. Ar XVvet rannad arme rusian zo chomet war an dachenn. Roumanegerien Moldova a dro o selioù war-du Roumania. Kêrioù zo n'int mui nemet tan ha gwad. Diaes e vo da

beder bro ar c'hornad, Rusia, Ukraina, Moldova ha Roumania kavout un diskoulm buan evit ma paouezfe ar brezel.

Kudennoù all, luziet-spontus, a gaver e-lec'h all : Armenia, Azerbaidjan, Osetia...

Broioù Balt

Echu eo er media. Ne vez ket mui klevet komz eus an teir bro Balt. Ha koulskoude du-hont ivez e c'helle an traoù mont war drenkaat. Bresk-kenañ e chom o dizalc'hezh. En Estonia, da skwer, ez eus bet graet kalz a draoù arouezius pe aroueziusoc'h : ur moniz zo bremañ, aotreoù-tremen nevez-flamm, ur

Diyezhegezh rik

Prof da Sutiroliz

Ur statud nevez zo bet roet da 290 000 alamaneger Sutirol gant gouarnamant Italia. Harñvalout a ra ar rendaez etre Aostria hag Italia, mestrez ar vro abaoe 1918, bezañ tavet bremañ. Agrouet eo bet ar statud gant 85% eus kendalc'h izili ar strollad politikel SVP (Sud Tyroler Volkspartei), a zastum an darn vrasañ eus mouezhiadegoù alamanegerien an "Alto Adige" (anv italianek ar vro).

Pell amzer eo bet Sutiroliz oc'h ober "Aostrianed gant paperoù italian en abeg d'ur gwallzarvoud istorel" anezho o-unan. Huñvreal a raent e deiz an unvanidigezh, goude ma oa darn, eus an "Heimat Bund", o stourm evit ar frankiz vroadel. Hiñviken e asantont d'un harzoù a ra Italianed anezho, abalamour d'ar «pachetto», d'ar «pakel» en alamaneg (ar statud nevez) o gwarez, evit doare, kenkouz hag 20 000 svadet inizi Aaland, e Suomi, ar bihanniver gwellañ gwarezet en Europa, a-hervez.

An divyezhegezh rik a reno a pep lec'h, war an hentoù evel el lezioù-barn. Ouzhpenn-se e vo lakaet ar «proporz» da dalvezout evit ar staelioù hag al lojeroù, da lavout eo div drederenn evit an alamanegerien, hag un drederenn evit an italianegerien. Hag un emrenerezh ledan gant o gouarnamant war ar marc'had. Hag arc'hant evit ar gouarnamant kreiz : 4 500 miliard a lireoù evit unan eus pinvidikañ rannvroioù Italia.

N'eo ket gwall blijet italianegerien ar vro (20% anezho a o mouezhoù da MSI, an nevezfaskourien), gant ar statud nevez : e-pad un ugent vloaz bannak ne c'hallint ket esperout kavout labour er velestradurezh : re zo anezho evit ar poent, ha ret eo adkompouezañ ar c'hemandadoù. An alamanegerien koulskoude a gav gwelloc'h micherioù ar c'hewerzh pe an douristelezh, a zegas muioch a arc'hant. Surjianed ospitalioù a zo re nebeut anezho eta dre ma ne gaver ket alamanegerien a-walc'h ha ma ne vez ket divyezhek a-walc'h an italianegerien.

Hervez lezenn an emrenerezh e vezet ganet ezel-eus ur stroll yezhel : alamanek, romañchek pe italianek. Bugale ar 15 000 tiegezh "ouezhek" a rank dibab etre stroll o zad pe hini o mamm.

M.K.

* stae : implj

gompagnunezh nijerezed, bankoù. Ha koulskoude e chom nec'het-bras pennadurezhioù Tallin koulz ha re Riga pe Vilnius. Kalz a gudennoù a van c'hoazh da vezañ diskoulmet gant Moskov.

Rusianed zo c'hoazh mistri war ar velestradur ha pa vefe Estoniz ar vniistrad. Ar Rusianed-mañ eo a gomer kalz eus an disentezioù. Chom a ra c'hoazh 25000 soudard rusian er broioù balt. Sac'het eo ar c'hevraoù etra Moskov ha kêrbennoù ar broioù balt. Estoniz a vefe laouen o welet ar Rusianed o kuitaat o bro hevlene. Ar Rusianed avat ne fell ket dezho klevet anv a vont kuit a-rack 1997.

Brasañ aon Estoniz eo gwelet arme Rusia o reiñ an dorn da vihanniver rusianeger ar vro, evel m'eo c'hoarvezet e lec'h all. E miz C'hwevrer e oa bet votet lezenn ar vroadelezh. Digor a-walc'h eo poegwir e c'haller dont da vezañ Estoniad en ur ober ur bloaz hepken. Un dra zo rat avat : tremen un arnodenn war an estoneg. Fouket ez eus bet kalz rusianegerien a embann bezañ Estoniz. Hervez ar sifroù nevesañ 13,6% eus ar rusianegerien a gomz ivez estoneg, 25% zo gouest d'en em zibab. N'eus nemet ar re yaouank zo darev da zeskiñ ar yezh avat.

Da zibann Mezheven e oa bet nac'het ar gwir da votiñ da 5700 rusianeger o devoa dija goullennet kaout ar vroadelezh estonian. An Il. Klara Hallik, ministrerez a kar eus ar bihanniveroù a zispleg an traoù oval-mañ : "E 1940, Estoniz a yae d'ober 88% eus ar boblañs. Hiziv n'omp nemet 60%. Ur bempvedenn eus hor pobl hon eus kollet e-doug ar brezel hag ar gwaskerezh Komunour. Un afer a vev pe a varv ez eo evidomp hiziv".

Har er c'hornôg ?

En Iwerzhon ez eus c'hoarvezet un darvoud ne cheñcho netra drezañ e-unan met a c'hello kaout heulioù abouez. Evit ar wech kentañ abaoe 1922 e oa en em gavet asambles dileuridi eus strolladoù politikel an Ulster hag eus gouarnamant Dülenn e Londrez. Ne oa ket c'hoazh ar Sinn Fein ganto hogen war liesaet ez a an darempredoù etre ar strollad ha pennoù an lizioù katolik ha protestant e Norzhiwerzhon. Tri lankad zo da vezañ en divizoù. En hini kentañ e tle an daou strollad unanelour DUP hag UUP, an SDLP ha strollad an Unvaniezh (strollad ennañ katolik ha protestanted) klask ijinañ un doare nevez da aozañ buhez velestradurel ha politikel Norzhiwerzhon. En ail lankad emañ ar strolladoù-mañ da gaout divizoù gant gouarnamant Dülenn. En trede e vo kevraouerezh euen etra Dülenn ha Londrez hag a c'helle reiñ muioch a wirioù da Dülenn war vuhez norzh ar vro.

Plemaon o skrivañ ar pennad-mañ e klevan er skingomz ez eus bet emglev etre Herri Batasuna hag aozerien Tro-Frañs ar marc'hoù-houarn. Ret d'an aozerien ober gant an euskareg, lakaat banniel Euskadi war-wel, hag all...

Un arouezeg e-touez degadoù a re all. Ur pennad zo e oa bet embannet ur gartenn eus pobloù Europa gant Euskariz. "Kartenn an ETA" a oa bet skrivet war "Evenement du Jeudi" atav war glask traoù sebezus. Un nerzh dichortoz zo o tremen dre ar c'hemandir a-bezh a laka an tamm kartenn-mañ da vezañ tostoc'h-tostañ ouzh gwirvoud ar Stadoù anavezet. Gant ma ouio ar Stadoù nevez-mañ chom hep dreveziñ o mistri kent ■



Ober gant an Euskareg, lakaat banniel Euskadi war-wel

SIDA 5000 den tapet bemdez

Ar SIDA (arouez donedigezh diouer a ziaerbennoañ) a zo strumm grevus ur c'hleñvedoù a virus anezhañ dre zampredoù reizhel, pe eskemmoù gwad : kontamm ar VIH. Daoust da ziouer a louzoù a-ehep ar c'hleñved, e c'heller mirout ouz ar c'hleñved memestra : ne vezer ket kontammet o vevañ gant tud klañv. Anavezet mat a-walc'h eo doareoù redig ar c'hleñved : un arvar ha n'eo ket diflach eo ar SIDA.

Penaos ?

Gallout a reer mirout ouz ar c'hontamm, dre ma vez kavet ar virus en diveradurioù reizhel (spañ pe diveradurioù ar forz) pe ar gwad. An darampredoù reizhel suroc'h (-saler sex- e saozneg, pe S.S.R., reizh diarvan) a vir ouz an diveradurioù-se da zont da douchal krechin diabarzh (ganou, forz, kraez). Ar c'hroc'hen (hep biol-sadenn ebet) ne lez ket ar virus da dremen. Displegit d'ho mignoned e implijit an doareoù-suroc'h da c'hoari etrezoc'h, sikour a ra kalz an displegadurioù frank. Implijit itav un dalc'her pa 'z eer e-barzh, doare nemetañ da virout ouz ar virus da vevañ traukaset eo.

Evit gouzout...

M'ho peus bet darampredoù anvarus, pe m'ho peus c'hoant gouzout muoc'h diwar ho stad, n'eo ket day mont d'an daoulamm ruz d'ar greizenn-arnodif : c'hwec'h sizhun da nebeutañ a zo ezhomm gortoz etre donedigezh ar virus hag ar seropositivité, da laret eo evit ma vefe tu da gavout roudoù ar virus er gwad. N'eo ket klañv avat an hini a zo gant seurt roudoù en e gwad avat : gallout a reer gortoz ouzhpenn dek vloaz a-raok ne krogle ar c'hleñved da vat. An arnodenn-gwad a c'hleñved da vat. An arnodenn-gwad a c'hleñved da vat. An arnodenn-gwad a c'hleñved da vat. An arnodenn-gwad a c'hleñved da vat.

c'hleñvedoù a c'hellit tapout asoc'h, dre m'eo gwanaet difennoù ar c'horf gant ar virus. Kenderc'hel da gaut darampredoù reizhel suroc'h a zo ret ober ivez eveljust.



Ar pezh a c'heller ober

Kavet e vez ar virus en halo ; biskoazh n'eo bet kontammet den gant ur pok koulskoude, ken don ha ma vije bet. Ne daper ket ar SIDA dre stardañ daouarn un den klañv, na dre al loened doñv, nag an amprevaned kennebeut, hag e c'heller implijout an hevelep prveziou, an hevelep salioù-dour ha mont da neuial en hevelep poull hag un den klañv.

Hegareg

Aides Breizh,
35bis ball Liberté,
35000 Roazhon
Tel. 99 79 06 04
Nnn. c'hias : 05 36 66 36



Ur paotr yaouank en Ouganda, o skignañ dalc'herioù d'an dud er straed. Profet int gant ar gouarnamant d'ar wazed a zeu e kêr da labourat, hag o deus darampredoù reizhel niverus, o vevañ ma 'z int o-unan penn er gêr vras. En Afrika eo eo ar spontusañ reuz ar c'hleñved. Grevus-meurbet e vo an elfedoù war demografezh Afrika, India hag Azia ar gevred a-benn dek vloaz.

Kontammañ ar gwad, torfed stad

Pevar medisin a zo dirak al lez-kastiz dre m'o deus aotreet gwerzhañ gwad kontammet gant virus ar SIDA d'an diwadedien (*). Nemet aotre ebet ne c'halle bezañ roet hep asant ar bolitikerien, da lavarout eo ar c'hentañ ministr Fabius marteze, ministr ar yec'hed Georgina Duloix moarvat (a gredas lavarout "kirek on, met kabius n'on ket"), hag ar sekretour-stad evit ar yec'hed ha maer Roazhon Edmond Herve sur a-walc'h ivez. A drugarez dezho eta ez eus bet kontammet 2 000 diwadedeg, tremen 250 anezho marvet no abred evit goullenn digoll goude an torfed. Hini ebet eus ar bolitikerien-se avat ne vo tamallet dirak al lezioù-barn ; ne vez ket barnet ar bolitikerien er Stad-Chall, ha p'o defed gwad (kontammet) war o daouarn. Tu a oa bet, un daou viz zo, da glevout Bernard Kouchner er skinwel o c'houlenn pardon digant ar familhoù, en anv ar vedisined. En anv ar bolitikerien avat, netra. Faos eo eta ar c'heloù e vije digoust ar metro e kêr Roazhon evit an diwadedien kontammet o devo pasianted a-walc'h da chom hep mervel a-raok digoradur al linenn gentañ gant Edmond Herve ; memes priz evel ar re all. Evit ar maer ivez ?

Diwadedeg : HémoPhile (DCFB R. Le Gléau), M.K.

Labour-Douar Sifroù an dic'hoaneg

Montroulez tregont vloaz zo ! Sed a zo bet klevet amañ hag ahont, da gefver manifestadeg al labourerien-douar, da zibenn Mezheven. Reuz zo bet dre Norzh Breizh a-bezh, eus Gouele-Leon da Gonkaven. Diaes a-walc'h e c'hell bezañ da gèridi kompren seurt barradoù feulster. An nebeud sifroù a vo kavet da heul a zo ganto, sur-mat, un tamm eus an displegadenn.

Breizh er penn a-raok

8000 labourer-douar zo o vevañ diwar ar gounid legumaj e norzh Breizh. En tu-hont da 750 000 tonennad a legumaj a ganderc'hout, ar pezh a zo ur c'hengread a 1,673 miliard a lunoù... Strivet kalz o deus labourerien-douar Breizh. Ha splann eo an disoc'h : 88 % eus kaoñ-fleur Frañs a vez kenderc'het e Breizh, 81 % eus an artichoed, 70 % eus ar patatez-abred 65 % eus ar chalozez, 95% eus ar saladen "iceberg", 65 % eus ar brouskal... Hep ankounac'haat an tomat, an endivaz, ar c'harotez, ar pour, al letuz...

War washaat bepred

O klask lazhañ ur vro a oa deuet a-benn da vevañ er penn a-raok dre forzh labourat emañ, eme ar sindikadoù peizanted. Fall-kenañ e oa bet an traoù evit ar c'haol-fleur, an endivaz, ar c'harotez, ar brouskal hag an tomat, er goañvezh-mañ. Kemend-all a c'helle bezañ gwir evit an artichoed a-raok pell. Hervez ar CDJA hag an FDSEA ez eus bet emporzhet legumaj "evit abegoù politikel". Patatez ha tomat zo bet lakaet da zont eus Maroko ha kig eus

broioù ar reter. Kemend-all zo bet graet en holl vroioù Norzheuropa e-keñver broioù Sueuropa ha Norzhafrika. Patatez eus Kiprenez hag eus Ejipt zo bet prenet gant Breizh-Veur, da skwer. Un darvoud all en deus lakaet peizanted Breizh diaes-bras. Digresk priz an edeier en deus broudet peizanted Bro-C'hall hag Okitania da liesaat o c'henderc'haoù en ur lakaat kreskiñ legumaj ; endivez e norzh Bro-C'hall, karotez ha patatez en Akitania. Hag ar prizioù da ziskenn gant ar berniadoù legumaj kenderc'het... Mar lakaer, war ar marc'had, adreizhadur ar PAC, a laka c'hoazh ar prizioù da ziskenn hag a reoliek ar prizioù da kementadoù da vevañ kenderc'het, e komprenet aes e peseurt pleg diaes emañ labourerien-douar Breizh.

Gant ar patatez abred e oa ar gudann da zivwez Mezheven. Diwar ar 80 000 tonennad lakaet war ar marc'had, 15000 a oa chomet hep bezañ prenet... Bez' emañ ar baizanted o c'hortoz e vefe kemeret an diarbennoù ret gant ar gouarnamant evit ma c'hellfen tremen ar mare fall-mañ hep mont da greskiñ niver enskrivioù Burevioù al Labour.

Maodez al Lez
Kenderc'h : produere Kengread ; chifre d'affaires



Peskerezh

Bigi o rouesaat hag o koshaat

Goude steufn Mellick emañ adarre Brusel o c'houlenn e vefe nebeutoc'h a vigi-pesketa. Kement-mañ a c'hell talvezout chom hep domernaat bigi aet kozh pe chom hep reiñ skoazelloù evit lakaat sevel bigi nevez. Nec'het eo pesketourien Breizh.

Enkadenn

Enket an em gav muioch-mui ar besketourien. Nabeutoc'h-nebeutañ a besked a vez ha war ziskenn ez a ar prizioù ivez. Ha gwasañ zo : emporzhet e vez pesked ! Kinnig a ra bremañ Brusel, evel diaez d'ar c'hveuroù, e va digresket eus 27% niver bigi-pesketa Frañs. Daoust da bep tra e klask ar Vretoned mont war-raok avat. O vodemaat porzh-pesketa Konk-Kernev emañ. 130 milion e kouste. E soñj e oad ober labourioù war 39 bag hevlene, evit ur sammad a 69 milion. O c'hortoz skoazell ar Stad c'hall emañ avat, skoazell a vo diouz disenteziou Europa. Evit ar mare ez eus sur e vo tu da ober war-dro 12 bag heplenn. Divizet ez eus bet ivez chom hep arc'hantaouñ bigi nevez gant Europa... Disentez diboañ, a lavar pesketourien Breizh, hag a zo a-du evit digreskiñ niver ar bigi, a-hend-all. Ar pezh n'hllont ket degemeret eo lezel ar bigi da goshaat betek re avat. An hanter eus an 82 vag keinvor a zo e Breizh zo ouzhpenn 15 vloaz. En Oriant hag en Intel ez eo 26 bag diwar 36 a vo oad-se ! Daoust ha ret e vo gortoz e vefe 30 vloaz ar bigi a-raok kaout skorennoù d'ober un tamm kempenn dezho ?

Reolennoù re strizh

Chalet eo ar besketourien gant un disentez all. Rannet e vo ar bigi etre takadoù-pesketa, doare peskerez hag etre seurtoù pesked zoken. Strizh-kenañ e vo an traoù eta ha ret e vo da bep hini chom en e daked ha pesketa ar pesked a aotrer diazhañ pakañ gant an doare bet disklariet d'ar pennadrezhioù ! Evit ar besketourien ez eo ret lezel frankiz da cheñch takad ha da cheñch doare peskerez. Termenñ renkadoù dre vras a c'heller. Mont re baill zo koulez ha kondaññ ar peskerez.

Maodez al Lez

Kreizenn-enklask war an anvioù-lec'h

A-drugarez da stourmadegoù niverus e weler bremañ muioc'h-mui a banelloù brezhonek war vord an hentoù. Ul labour skoueriekaat hag aliañ a vez kaset da benn, didrouz, gant ar Greizenn-Enklask war an anvioù-lec'h hag ar panelloù-heñchañ. Deuet ez eus c'hoant dimp da c'houzout hiroc'h diwar he fenn. Aet omp d'ober un nebeud goulennoù ouzh Divi gKervella, he c'hadoriad.



BREMAÑ : Ha gallout a rit lavaret dimp abaoe pegoulz ez eus aus ar Greizenn-Enklask war an anvioù-lec'h hag ar panelloù-heñchañ, Petra eo he falioù pouezusañ ha penaos ez a en-dro?

D. KERVELLA : E diabarzh Skol-Uhel ar Vro eo bet savet ar Greizenn-se, e 1986 — un unan eus ar c'hwetek kevrenn a zo enni evit bezañ resisoc'h, hini "Yezh ha Yezhoniezh". D'ar c'houlz-se e oa panelloù brezhonek o tiflukañ war vord an hentoù, dreist-holl en antre ar c'hêrioù, ha ret eo anzav e oa dizingalkaer an disoc'h: e-kichen traoù eus ar c'hentañ e oa ivez fazioù gros ha dibaboù all a oa meur a abeg da gaout enne. Un ezhomm aliañ ha kelaouiñ a oa, se oa sklaer. Hag a-raok aliañ eo ret studiad, gwelet ar reolennoù da ginnig ha gwelet an traoù gant ur sell hollek war live Breizh a-bezh. Ur bern tud a oa bet c'hoazh o plediñ gant ar gudenn-se, hemañ war ar stummoù-kozh, hennezh war an distagadurioù, henhont war an daou zoare met er c'horn-mañ-korn hepken. Betek neuze, avat, e oa bet pep hini o labourat en e bart a-unan ha ret eo anzav e oa disañval-bras o diskoulmoù! Al lenneria a oar ervat e c'hallent lenn tro-ha-tro Roazhon ha Roazon, Lannuon ha Lanuon, Kraozon pe Kraon (pa ne oa ket Kraozhon!), ha me "oar me...". An diskoulm nemetañ, bodañ an holl, gwelet ar c'hudennoù, diazezañ reolennoù ha reiñ da anaout al labour-se... Buan a-walc'h e voe gwelet ivez ne oa ket kudennoù nemetken gant an anvioù-lec'h, gant ar panelloù-heñchañ e oa

ivez, ar panelloù a-seurt gant "kreiz-kêr" "archerdi" hag all. Un dachenn koulz lavaret difraost betek neuze. Ha dre ma'z a e an amzer hebiou ez eus bet goulennet traoù all diganimp ha tu zo da lavaret ne glot ket mat ken anv ar greizenn gant he labour, danvez hol labour o vezañ kentoc'h bremañ ar "brezhoneg er vuhez foran" pe ar "brezhoneg a-wel d'an holl". A-benn elodusaat al labour eo bet rannet an traoù dre vodadoù. Betek-henn ez eus pevar: daou vodad bras: "lec'hanvadurezh dre vras" ha "geriaoueg ar vuhez foran", ha daou vodad muioc'h arbennik lakaomp: anvioù-lec'h gorre ar vro ha gwenedeg ha brezhoneg unvan. Diouzh ma vo e vo krouet reoù all. E penn kentañ, ha se betek 1991 e oa Lukian Kergoat kadoriad ar Greizenn-Enklask...

Piv a c'hall bezañ ezel eus ar Greizenn-Enklask? Pat ezel zo hiziv?

Digor eo ar Greizenn-Enklask d'an holl. Me "gav din ez eus tost da gant ezel a-benn bremañ, o tont eus pevar c'horn ar vro hag eus pelloc'h zoken. Hag ezhomm 'm eus da lavaret ez eo dre ar brezhoneg hepken e vez kaset al labour war-raok?

Daoust hag anavezet eo ar Greizenn ez-offisiel gant ar Rannvro, an Departamantoù?

Ez-offisiel n'eo ket tre. Un dra zo sur kenlabourat a reomp gante. An daou zepartamant a ra gant panelloù divyezhek o deus savet bodadoù-

arbennigourien war ar c'hraf-se hag e-barzh enne emaoomp. Gant hini Penn-ar-Bed e oa bet goulennet diganimp reiñ ur stumm reizh da holl anvioù kumunioù an departamant. Ingal e kenlabouromp gante p'o devez tra pe dra da lakaat e brezhoneg. Ha mont a rafen betek lavaret ez omp zoken un tamm jubennour etre an departamantoù evel ma rafent labour heñvel rak techet ez int ur tamm d'ober evel an eskoptioù gwechall, pep hini diouzh e du hep sellet ouzh e amezeg!

Evit pezh a sell ouzh ar Rannvro n'eo ket aet ken pell an traoù, daoust m'eo bet krouet Skol-Uhel ar Vro gant ar Rannvro N'eus politikerezh yezhel ebet ganti evit pezh a sell ouzh an anvioù-lec'h nag evit brezhonekaat ar pezh a reont... Cheñch a raint 'michañs.

Labouret hoc'h eus kalzik war c'houlenn kumunioù zo, a gav din. Ha gallout a rit lavaret dimp pelec'h ho poa graet al labourioù pouezusañ?

Gwellet hon eus bremañ e oa bet kinniget ganimp ur stumm da erbediñ evit holl gumunioù Penn-ar-Bed. Evit kornaoueg Addou-an-Arvor ivez eo bet graet ganimp dre vras. Kumunioù zo ivez o deus bet goulennet diganimp reiñ traoù gant an anvioù-lec'h bihan, ar pezh hon eus graet breped gant plijadur vras, soñjal a ran da skouer e re Tregon. Kumunioù all a c'houlenn penaos skrivañ anvioù o straedoù pe o savadurioù. Boul'het e oa bet an traoù gant kêr Karaez. Kêr Gwengamp zo bremañ war an hent-se ivez, hag ur skouer eo al

labour o deus kaset da benn war atiz Kreizenn Roparz Hemon. War un taol kaer emaoomp bremañ gant unan eus kêrioù pennañ Breizh: hini an Oriant. Ur gevrat hon eus sinet ganti. Mar bez doujet d'an divizoù e vo reizhet skrivadur ar c'harterioù, divyezhekaat pep panell-kêr. Evit ober labour sirius ez eus bet gopret un den e-pad tri miz evit ober an holl enklaskoù a oa ret hag evit sevel ar c'hinnigoù — gant Mikael Briant evit chom hep ober gant e anv. Ul labour eus ar c'hentañ zo bet kaset da benn gantañ hag an dra-se a vo ur skouer ivez evit kêrioù all ar vro.

Penaos e labourit pa vez graet seurt goulennoù?

Klask a reomp kaout ar muiañ a dafar labour: evit Breizh-Izel e vez ret kaout distagadurioù, n'eo ket hepken war al lec'h (e-lec'h ma vez krennet pe distummet alies an anv) met ivez pelloc'h ha se digant ar vrezhonegerien wellañ, dre vras ar re goshañ. Diouzh un tu all e klaskomp stummoù skrivet an anv-mañ-anv e-barzh an dielloù, al levrioù, ar studiadennoù ha me "oar-me...". Ma klot istor ar ger gant an distagadur n'eo ket diaes sevel ur stumm a anvomp-ni "skoueriekaat" (da lavaret eo hervez ar brezhoneg a-vremañ), ma ne glot ket an daou ez eo ret ober un enklask donoc'h e leu an dizemglev-se ha reizhet an traoù. Allies ivez eo ret en em glevet gant an dilennidi pe tud ar vro, displegañ dezhe ar penaos eus ar perak.

Daoust hag-añ e sav kudennoù a-wechoù gant dilennidi zo?

A-wechoù, siwazh ya! Mantrus eo penaos eo gwelet ar brezhoneg e lec'hioù zo, pe da vihanaf e-barzh Pennizo: «Me eo krakprezidant Landibido hag a-viskoazh eo bet skrivet "Garca à Sauce" ha da viken e vo, ganeoc'h-chwi n'eus "met brezhoneg an tele"! Reoù all ne blij ket dezhe gwelet tud eus an diavaez o tont d'ober war-dro traoù ar gumun lakaomp, ha prest ez int da ginnig n'eus forzh petra all, ha pa ne oufen na bu na ba eus ar yezh... Ur ouenn diaes eo ivez ar re a ra "etimologiezh poblachel", tud zo barrek da zisplegañ doec'h e talvez Gwinevez kement ha "vin nouveau" ha "Pempoull", ma vefe bet unan ouzhpenn e vefe bet "c'hwec'hpoull"... Ur rumm all diaes ober gante eo ar re a gav dezhe emaint o tifenn "distagadur tud ar vro", ar re-se a gazi kement hag ar re gentañ allias. Gouenn a reont skrivañ *Mouñki e-lec'h Meriadeg, Bak e-lec'h Bouzeg, Kpac'h e-lec'h Kemper, Landi e-lec'h Landivizio*, evit darn zoken e vefe ret skrivañ foneteg war ar panelloù! Ar Greizenn-

Enklask a c'hallfe un deiz bennak embann ur "sotoniaoueg"! Ar bihanvier dister eo avat. Evit Penn-ar-Bed, evit ar c'hunioù, hon eus bet un dek kumun bennak o nach panelloù brezhonek; un stummoù n'haller degemer e doare ebet; pezh a rannimp dezhe, a-wechoù hon eus rannet laboul un tammig met evit ouzhpenn an 3/4 eus ar c'hunioù ez eo an dibab ar reizhañ hag ar gwellañ zo bet graet hag ar c'hudennoù zo manet nemet gant kumunioù bihan, pa vo cheñchet maer enne e vo tu da beurwellaat!

Petra eo dre vras an doare da skoueriekaat hervez ar Greizenn?

Ret eo kaout ur stumm reizh e-keñver orin ar ger hag ar stummoù anavezet gant ar vrezhonegerien, ret eo e vefe reizh e-keñver yezhadur ha reizhskrivadur ar yezh, hag ar memes doare da sellet ouzh an traoù evit Breizh dezhe, dre vras ez erbedomp ar stummoù hir (*Logeginer* ha neket *Logi*), meur a *Blounevez* a zo, meur a *Logivi* ivez (skrivet e vo neuze ar ger resisaat war-lec'h zoken ma ne vez ket implijet-kenañ er gumun — met pelloc'h e vez); nach a reomp avat an astennoù touristel a-seurt gant *plages, sur-mer...* Da ziwec'h, ken skrivet ken komzet evit ober an dibab diwezhañ: stummoù damfaziuz o deus bet graet o zreuz abaoe keld-all e bed ar brezhoneg ken n'eus ket tu da zont war-gil ken, abaoe kantvedoù a-wechoù evit anvioù gant Sant; evel ma lavare ma diagentad: ret eo dibab a-wechoù *tre* ar skiant-var! Un dra all a c'houlennomp ivez eo kaout ar memes ment lizherennoù hag ar memes doare da ginnig an daou skrivadur.

Plediñ a ra ho kreizenn gant traoù all estreget al lec'hanvadurezh. Lavaret dimp ur ger bennak a-zivout ho labour war geriaoueg ar vuhez a-vremañ.

Lod bras all hon labour ez eo. Ha muioc'h-mui a blas e kemer. Dre ar panellerezh-kêr ez omp deuet tamm-ha-tamm d'ober war-dro kement a sellet ouzh ar brezhoneg ar vuhez foran. Ul labour ramzel zo da gas da benn. Ret dimp bezañ sklaer ha resis. Evel m'eo anat d'an holl ne davez ket ur "maen-hir" kement ha "taol-vaen", n'haller ket kennebet, da skouer, ober gant *Ti an tailho* nemetken evit traoù disañval ha "perception", "recette-parception", "trésorerie", "recette des finances", "hôtel des impôts" da skouer, hag evit an holl draoù-se eo ret e vefe heñvel dre Vreizh a-bezh. Labouret hon eus war draoù

disañvel-bras, adalek melladoù al lezarnoù a vez lennet en lez-kêr pa sav c'hoant da zaou bichon mont d'ober un tennad-hent asambles gant benedictia an aotrou maer betek arz rallijel ar chapeloued a-hed ar c'hartvedoù e Tregor zon.

Un dra all a gavomp a bouez ivez eo ar brezhoneg e c'henwerzh. Un doare dispar eo da zegas ar brezhoneg evit traoù ar pemdez. Pledet hon eus gant panellerezh Ralliey an Oriant, graet kinnigoù evit brezhonekaat stalioù Spried da gefiver Goual Brodel ar Brezhoneg, hag a-benn an diskar-amzer-mañ e vo ur c'houlz mat all war an dachenn-se, met ne lavarin ket muioc'h evit ar poent...

Emaoc'h o paouez lakaat da zont er-maez ur C'heriaoueg-diaez ar vuhez foran. Petra a gaver enni? Evit piv eo bet graet?

Enni e vez kavet ar c'hant ger diaez evit ar panellerezh e kêr. Muioc'h eget kant ger a vez kavet enni peogwir e varker, hervez an dagouezh, meur a zoare da dreiñ un termen gallek pe a-wechoù gerioù zo kevatal o ster. E-barzh e kaver ivez alioù war an doare da ginnig ar brezhoneg. Graet eo bet da gentañ pann evit ar pennadurezhioù, evit ar re o deus un tamm galloud e Breizh, evit o broudañ da lakaat hor yezh e pep lec'h hag ivez evit ma vefe reizh ha kempoell ar brezhoneg-se. Sklaer eo ivez eo graet ar c'heriaoueg-se evit an holl vrezhonegerien a vann bavañ e brezhoneg hiziv an deiz, en o zouez tud ar c'helouennoù, ar skingomz hag ar skinwel hep anoukaat tud ar skolioù...

Ar sif "1" a weler war ar golo. Re all a vo embannet buan?

Mont a ra homañ buan er-maez. Buan e vo ret plediñ gant unan all na vo ket "diaez" ken hogen a vo e 500 termen bennak e-barzh. Ha tro hor bo moarvat, un deiz bennak, d'embann ur gwir c'heriadur. Echu eo gant hor pennad «level hag ober», bremañ ne davimp ket ken war ar pezh a reomp.

Ha gouest e viot un deiz bennak da lakaat ur gartenn-heñchañ da zont er-maez? A-benn pageñ?

Hor pal ez eo. N'eus raktres resis ebet evit ar poent avat. E-pad ur pennad e oa bet un ti-embann eus Pariz damzedennet gant ar soñj... N'eus bet netra da heul. Park an Arvorig zo deuet a-benn d'an em glevet gant an IGN evit lakaat tammou brezhoneg war o hini. An dra wellañ a vefe kenbenn gant un ti a-razoñ rak n'eus ket kregin a-walc'h ganimp evit sevel unan war-eeun a vefe e liv hag ail.

Raktresoù all war ar stem?

Geriaoueg arbennikoc'h eget an hini genañ a zeu er-maez hepdale. Evel ma oa bet lavaret ganin bremañ hon eus graet war-dro ar brezhoneg hag ar c'henwerzh. Danvez ur c'heriaoueg da zont e vo. Unan all ivez diwar-benn ar savadurioù istorel (meurvein, ilizoù ha chapelioù, kestelloù...) hag an arz a ya d'o heul rak muioch-mui e vez paneloù-displegañ e-kichen al lec'hioù gweladennet, hag ar brezhoneg a gaoz e blas warne a liesoc'h-aliesañ. Graet hon eus evel-se war-dro re Goad-Breselien ha re Dreger.

Ur c'heriaoueg all hirc'hortozet eo hini anvioù-lec'h pennañ Breizh gant ar c'hmunioù, ar c'hañs, ar c'hañsioù, ar c'hañsioù ha me 'oar-me... Honnez a zlefe dont er-maez a-raok pell. An holl re-mañ a zlefe dont er-maez e-kerzh ar mizvezhioù da zont. Raktresoù all zo c'hoazh rak n'eo ket an danvez a vank! Ha marteze hini pe hini eus al lennerien en dije bet labourer war dra pe dra a c'hallje dont da vezañ danvez unan...

Evit echuiñ e c'hallfec'h lavaret d'hol lennerien penaos mont e darempred gant ar Greizenn-Enklask war an anvioù-lec'h hag ar paneloù-heñchañ?

N'eo ket diaes, dezhe da skrivañ d'ar Greizenn-Enklask e ti Skol-Uhel ar Vro BP66A, 35031 Roazhon Cedex pe gwelloc'h c'hoazh pellgomz d'an 99.38.98.88 hag eno e c'hallint komz war-eeun gant hor c'henurzhier Olivier Mogn.

Un dra all ivez marteze a-raok echuiñ. Pedit a ran kement den kar-e-yezh da vruañ en-dro dezhañ labour ar Greizenn; pa'n em gavont gant o maer, o c'hannad, ar stalioù a zarempredont... Gant kenskoazell ha kenlabour an holl eo e teuy ar brezhoneg e-barzh!

Trugarez dezoc'h, Divi gKervella, ha kalon vat!



50-vet deiz ha bloaz B.A.S.

Ar Bagadoù er gevredigezh

D'ar Sadorn 13 a viz Even e oa dalc'h et Meilh ar Wern, nepell eus Kastellin, ur c'hendiviz aozet gant Bodadeg Sonerien Penn ar Bed. Pal an devezh-se a oa prederiañ, un nebeut mizioù araoz 50vet deiz ha bloaz ar strollad, war blas ar sonerien e kevredigezh Breizh.

Piv omp, penaos e vezomp gwelet gant ar strolladoù sevenadurel all, ar mediaoù, ar bed ekonomikel ha politikel, peseurt plas a rankomp kemer ha penaos dont a benn ? Setu aze un nebeut goulennoù bet lakaet da ziazezh evit ar c'hendiviz. Daoust d'an amzer bezañ bet un hanter re verr evit donaat pe respont da bep tra ez eus bet tro da gregiñ ganti, gant eskemmoù dedennus.

Brezhoneg ha Sonerezh, enebiezh ?

Evit magañ ar preder e oa bet pedet tud diavaez : Jakez Bernard ("Masteis Production") Lukian Kergoat (Skol Veur Roazhon) Alan Pierre (War'leür) Annaig ar Gars (Emgann), Martial Menard (An Hère). Kaset e voe an diviz gant an animatour Yves Philippe. Kerkent ha kroget an diviz e tisklerias Lukian Kergoat : "Ur mank spontus a labour boutin a zo etre BAS hag ar re all" o vont betek keñveriañ ar strollad sevenadurel d'ar c'hlan ispisializet war ar sonerezh tra ken ? "Mard eo bet kroget ar c'hemplez da vezañ lonket, m'eus aon n'eo ket bet goet gant meur a hin" hag ar sokio-yezhoù da ganderch'el o displegañ an dilorc'h etre ar yezh : ur benveg darempredañ hag an arzoù a bep seurt : dañs, sonerezh...

Herve Ar Meur, Prezidant BAS Penn ar

Kenstrivadeg danevelloù

Gant an UPB (Université Populaire Bretonne)

Da geñver digoradur mediaoueg an Oriant, e vo aozet gant UPB, ti-kêr an Oriant, Kevredigezh Skrivagnerien Breizh, Skol Uhel ar Vro hag embregerezh Breizh ur genstrivadeg danevelloù diwar danvez Breizh, e Galling hag e Brezhoneg. Digor eo d'an holl, annezad eus Breizh pe a-ozin eus unan eus pemp departamant Breizh. Pev ar

Bed a respontas "N'omp ket holl "biriniked" stag ouzh hon roc'h, brezhoneger on hag am eus graet sonerezh ; ur gudenn a amzer eo, n'eus ket tu ober pep tra".

Fazi Piv ? ar media, evel just !

Dipitus eo memestra e em sant'fe diouzhtu pep hini taget. Gwelloc'h e voe an traoù pa voe kaoz eus skeññ war an enebour, ar media evel just ; fazi ar c'hazetennoù hag an tele eo ma ne ya ket war-raok an traoù. Un tammig aes memestra !

Met deus pelec'h e teu an dizarempred etre ar re a stourm evit ar sonerezh ar stourmerien ar brezhoneg ? "Emañ ar giregezh gant strolladoù politikel Breizh post 68" eme Erwan Ropars, "e 1959 ne oa kudenn ebet, an holl a labour e unvan".

An holl bremañ a oar koulskoude ez eus meur a hent evit an em santont breton, pe e vefe o teskiñ brezhoneg, pe o tridal o selasoù sonerezh Breizh. A-du e voe an holl da echuiñ an tabuloù kozh, ha mont war-raok a-gouret. Votet e voe a unvoazh ur mennad evit reiñ ur statud d'ar brezhoneg. Ur brouenn all, fetis : muioch-mui e vez kavet brezhonegerien vihan Diwan er bagadoù, kelc'hioù, skolioù dañs ha sonerezh ar vro : aze e vez skoulmet en dro liammoù evit an dazont

Elena Riou

Gouel Broadel ar Brezhoneg

Spezed kêr dieub

Gouel Broadel ar Brezhoneg zo deuet da vezañ un darvoud a-bouez e buhez sevenadurel ha politikel ar vro. Abaoe 1987 e aoz EMGANN ha SAB ar gouel-mañ. Ar bloaz-mañ avat, zo bet kalzig a gemm. Eus Karaez eo bet kaset ar gouel da Spezed a zo bet "dieubet".



Tri devezh en deus padet ar gouel. D'ar Gwener 5 a viz Mezheven e voe kroget an traoù e Karaez gant Kanerien Sant Karanteg. E touez lezioù-kanañ gwellañ Breizh eo ar re-se. Al lod brasañ eus ar gouel avat, a voe e Spezed d'ar Sadorn 6 ha d'ar Sul 7. Ouzhpenn 6 000 a dud o deus kemeret perzh en devezhioù gouel ha stourm.

Gwellañ sonerien Breizh

E Spezed e voe kroget an abadenn gant Alan Stivell hag e strollad. Ouzhpenn e donioù nevez e voe tu da glevet digantañ lod eus e donioù kozh. Da heul e voe fest noz gant strolladoù, sonerien ha kanerien. D'ar Sul e voe an "abadenn vour" gant Becker, Dibenn, Bagad Kemper, Klik ha Fars, Shannon, Réve de Gosse hag E.V. a entanas ar saliad. Ur fest-noz a voe da c'houde evel-just. Un dibab eus ar re wellañ e Breizh war tachen ar sonerezh eta, a voe en em gavet e Spezed.

Sport e Brezhoneg

Ouzhpenn sonerezh a voe er gouel. Ur genstrivadeg mell-droad gant ar vugale, gounezet gant skipailh Spezed a-enep da skol Diwan Brast en dro dezhañ. Ur c'hroget gant ar re vras ivez etre Roazhon hag un dibab eus c'hoarierien ar vro : Spezed, ar C'hastell-Nevez, Karaez... Kein ouzñ keñ e chomas an daou skipailh : 1-1. Sportoù ar vro ne voent ket ankouezet : gourm, sevel ar berchen...

Politikerezh

"Gouel ha stourm" eo ger-stur aozerien ar gouel. Teir frezegegenn a voe klevet. Unan e anv komiteoù Breizh-Euskadi a c'houllenas dieubidigezh ar Vretoned toullbac'het evit bezañ roet bod da Euskaz. Unan all e anv Diwan distaget gant Loeiz Bocquenot. An treme a voe distaget gant Dominique Jolivet e anv Emgann ha Stourm ar Brezhoneg a zisklerias eo tremen poent stagañ da vat gant ar stourm ha gouini buan frankiz evit Breizh hag ar Brezhoneg, "panevz ez aimp da get".

Bank Broadel Breizh

Ar c'hemm brasañ ar bloaz-mañ eo a voe tu da baeañ gant bilhedoù bank Breizh. Warno e voe pennañ an duk Yann IV, Anna Vreizh ha Roparz Hemon. Bilhedoù 5,10 hag 20 ltr. Un emglev a oa gant ar genwerzhourien a asanto bezañ paeet gant argant ar vro. Er gouel eveljust hag e stalioù Spezed e voe paeet gant luroù Breizh. Ur bank a oa zoken evit kemm argant estren : 1 ltr Gall evit 1 ltr Breizh

Spezed Brezhonek

Pep tra a voe e Brezhoneg e Spezed an deizioù-se. Kement stal a voe bet brezhonekaet en diavaez koulz hag en diabarzh. Degemeret e voe mat-tre gant tud ar vro. Kalz anezho a gounez zoken da zerc'hel da "Spezed" kêr dieub ha brezhonek a-hed an amzer ha n'eo ket e-pad amzer ar gouel nemetken.

Gwenael Caradec

Disklêriadenn Diwan d'ar 7 a viz Even 92

Kenvroidi ker, Dont d'ar gouel-mañ, eo evidomp tud Diwan, un doare anat da ziskouez hor youl da ganderch'el gant al labour bras Kroget e Lambaol, e Bro Leon, gant ar skol vihan kentañ ha ledanaet bremañ war ar pemp departamant. Penaos emañ stad an traoù evit Diwan hiziv ? Evit pezh a sell ar skoldi ez a pep bloaz an niver war greskaat (tro dro ugent dre gant ar bloaz) hag ar gresk-se a diefe kenderc'h hag ar bloaz-mañ, tamm pe damm. Bez 'z eus bremañ eizh kant tri-ugent bugel, hag hor pal, arouezel kentañ, a zo mil bugel a benn ar bloaz. War tachen an arc'hant natra n'eo renket evit ar mare hag e ouzomp pegan arvarus eo diazezh Diwan. Hon dieù d'an URSAFF ne reont nemet kreskaat hag e vo memestra e keit ma nac'ho ar stad-c'hall ur renk a servij foran da Ziwian.

War an dachenn politikel ez a memestra an afer tamm ma tamm war wellañ. Bremañ e welomp gwelloc'h piv a zo a tu gouemp hag hon eus piljadur da welet penaos ez eus muioch-mui a dud e karg a-du gant Diwan. Dilennidi Rannvro pe re an departamantoù, eus n'eo forzh peseurt liv, a gomprian muioch-mui bremañ penaos eo gwelloc'h bezañ unanet da sikour Diwan evit personnelezh ha spereñ ar vro a zo un nerzh war an dachenn ekonomikel. Fellout a ra deomp amañ trugarekaat a greiz kalon Kuzul Meur Penn ar Bed ha dreist-holl Jean Yves Cozan evit o labour a-feson hag efedus.

Bremañ, goude pemzek vloaz war an dachenn e welomp mat piv a zo c'hoazh a-enep deomp. Ar stad, da gentañ evel just met siwazh ivez, ar strollad emañ gantañ ar galloud e Pariz. Disprezet a vez an Aotrou Dollo gant e strollad e-unan, a ra van da zisohjal e zanvez lezenn war ar yezhoù rannvro.

Fellout a ra da Ziwian mont atav war-raok evit bugale Breizh. Kroget mat eo raktes un eil skolañ, ha kentañ Lisa Diwan a vo digoret er Releg-Kerhuon a-benn d'aoz bloaz.

Evit ar mare, hon enebour brasañ a chom Mintirezh an deskadurezh c'hall. Kroget hon eus en-dro da c'houllenn groñs gant Jack Lang e vefe lakaet an abretañ ar gwellañ an diviz da vont. Moarvat 'vo komzet eus Diwan hag ar Brezhoneg, an devezhioù o tont, ha goullennet vo, deoc'h holl, ho sikour ur wech ouzhpenn ! Trugarez 'ta ha kenavo.

Evit Burev Diwan Breizh Loeiz Bocquenot

Tud yaouank e toull-bac'h an arme

EUSKADI : NAC'H SENTIÑ

Abaoe miz Mae ez eus bac'het tri den yaouank eus Hanternoz Euskadi abalamour m'o deus nac'het mont d'ober o c'hoñje.

Izili eus ar strollad PATXA eo Erik Lecharday, Nikolas Padrones ha Jean-Louis Lefort, hag embannet o doa un nebeut mizioù zo e nac'hent servijañ an arme gall, ha kemer perzh evel-se er stourmadeg bouc'het e miz Here 1991 gant Patxa. Embannet e oa bet gant ar strollad tud yaouank-se e folie dezho ren ur stourm ouz an arme, "benveg an urzh gall" en Hanternoz Euskadi. E Kreisteiz ar vro, e Stad Spagn, un dredrenn eus ar baotred yaouank en oad d'ober o c'hoñje a nach mont d'an arme e mod pe vod. E penn kentañ miz Mae e oa bet aozet gant Patxa ur gerzhadeg dre gerdadennoù Hanternoz Euskadi evit brudañ o stourm. Daoust ma oa bet berzet gwith gant Prefed ar Pireneoù-Atlant e voe kantadoù a dud o kemer perzh enni, war droad pe war varezh-houarn, o skignañ traktoù, o tougen gilonioù, o pegañ skriteloù. Meur a hini a voe harzet gant ar polis, evit "bezañ

galvet da nac'h sentiñ ouz an arme", hag en o zouez Erik, Nikolas ha "Lof" o doa embannet dirak an holl a-gent e nac'hent ober o c'hoñje. D'an 20 a viz Mae e oa bet barnet Erik ha Nikolas e Bourdel ha kondaonet e oant bet da bep a 10 miz toull-bac'h ; d'ar 27 a viz Mae e voe barnet "Lof" e Poitiers ha kondaonet e voe da 13 miz kar'char. Klasket o doa displegañ o soñj en euskareg d'ar varnieten, ha ne voent ket lezet d'ober... Ur vanifestadeg aozet gant Patxa, d'an 23 a viz Mae, da sevel a-enep an arme ha da skoazellañ an disujiñ bac'het a voe berzet adarre gant ar Prefed a chalvas bagadoù CRSed da virot ouz an dud da vanifestañ. A-raok m'o dije bet amzer da zisplegañ o gilonioù zoken a voe skoet garv gant an daou c'hant den o doa kredet dont, ha kaset e voe meur a hini d'an ospital. Abaoe penn kentañ stourmadeg Patxa eo sklaer e fell d'ar galloud mirout outi da vont war-raok. Daoust da se e ra

barzh ar stourm. Degemeret mat e vez gant kalz eus ar vroadelourien euskarat, ha skoazell en deus bet ivez digant an emsavioù enep-arme gall "klaseñ". Kantadoù a dud zo bet er manifestadegoù, er prosezioù. Daoust d'ar gwiskerezh n'eus seblant ebet ez afe ar stourm da get. Er c'hontrol, E-kreiz miz Mezheven e oa bet embannet gant 5 Euskarad yaouank all e nac'hent mont d'an arme.

I.K.

Baz' e c'haller skrivañ d'ar brizonid : Jean-François Lefort, 16066 Maison d'Arrêt 209 Faubourg du Pont Neuf 86000 Poitiers (Bro C'hall) Nikolas Padrones 34096 Maison d'Arrêt 17 rue Chouiney 33170 Gradignan (Okitania) Erik Lecharday 34065 Maison d'Arrêt 17 rue Chouiney 33170 Gradignan (Okitania) Evit gouzout hiroc'h hag evit sikour anezho : PATXA 23 bis rue des Tonneliers 64100 Baiona (Euskadi)

KEMBRAEG : AL LEZENN NEVEZ NE VO KET A-WALC'H

Goude mouezhiadeg veur miz Meurzh, pa oa aet war gresk niver mouezhioù ar strollad broadelour Plaid Cymru ha niver e gannaded (4 e-lec'h 3 a-raok), eo bet embannet gant gouarnamant nevez Breizh-Veur e vefe savet ul lezenn nevez war ar c'hembraeg a vefe votet e Ti ar C'humunioù a-benn an diskar-amzer. Met an nevezenti-se, a zo unan eus promesaoù pouezus gouarnamant nevez ar c'hentañ ministr John Major, n'eo ket bet degemeret gwall vat gant stourmerien ar c'hembraeg.



Abaoe meur a vloaz e veze goulnennet gant Cymdeithas yr Iath Gymraeg, ha gant meur a gevredigezh all, ma vefe savet ul lezenn nevez da gemer lec'h an hini zo bremañ, zo re gozh (1967) ha didalvoud, emezo, abalamour ma ne lak ket sklaer gwirioù ar gembraegerien. Kement e oa bet stourmet, ken en doa ranket ar gouarnamant sellout ouz ar gudenn adost : a-raok ar vouezhiadeg endeo o doa embannet an div gostezenn vras, ar Strollad Mirour ha Strollad al Labour, e savent ul lezenn nevez evit ar c'hembraeg mar befant anvet e penn ar Stad ; ha kinniget e oa bet un danvez-lezenn gant Cyngor yr Iath Gymraeg, ar bodad da guzuliañ ar gouarnamant evit a sell ar c'hembraeg. Evit ar Sekretour Stad evit Kembre e vefe graet ur c'hammed bras war-raok gant al lezenn emeur o fardañ "da reiñ an tu d'ar gembraegerien d'ober gant o yezh en o darempred gant ar velestradurezh". Gant ar raktres-se e vefe kreñvaet Cyngor yr Iath Gymraeg a zeule da gaout ur galloud ensellout, ha goulnennet e vefe digant ar velestradurezhioù gallout kinnig o servijoù dre ar c'hembraeg d'an dud a choulennfe. Hogen evit ar gouarnamant eo disheñvel stad ar c'hembraeg eus an eil korn-bro d'egile ha dre se, emezo, e chello ur goulnenn a vo reizh en ul lec'h bezañ direizh en ul lec'h all. Tud Cymdeithas yr Iath Gymraeg, ha difennourien all ar c'hembraeg, a lavar

e fell d'ar gouarnamant strishaat tachenn implij ofisiel an div yezh d'ar "rannvioù kembraek" (d.l.e. ar c'hornioù ma vez kaozeet kembraeg gant an niver-muiañ) ha, gwashoc'h, ne rafe ar velestradurezhioù gant ar c'hembraeg nemet pa vefe goulnennet gant an dud. Da lavaret eo ne vefe ket kenmet kalz traoù a-skoaz ar pezh zo bremañ, an hevelep spered a vefe o ren : ar c'hembraeg ne vez implijet gant ar velestradurezh nemet mar goulnenn an dud ober gantañ. Ul lezenn nevez reizh, emezo, a rankfe lakaat ar velestradurezh, an aozadurioù foran - ha pa vijent bet prevesañ (dour, tredan...) - da ginnig d'an holl dud un dibab etre ar c'hembraeg hag ar saozneg. A-hend-all ne dalvezfe ket al lezenn d'an holl gembraegerien, mat d'an emsaverien hapken, d'ar re mennet d'ober gant o yezh. D'ar 6 a viz Mae, en devezh ma voe embannet roll-labour gouarnamant John Major, hag ul lezenn nevez evit ar c'hembraeg warnañ, e voe tud o vanifestañ dirak burevioù ar Sekretour Stad evit Kembre e Kerdez, tud eus Cymdeithas yr Iath, eus Plaid Cymru, eus UCAC (unvaniezh vroadel kelennerien Kembre), da lavaret n'edont ket a-du gant kinnigoù Londrez ; ha bez' emaint e soñj kenderc'heli da stourm evit rediñ ar gouarnamant da zilaet e raktres ha da sevel ur gwir lezenn yezh a roio an tu da bep hini da vevañ e kembraeg pe e saozneg, diouz e zibab ■ I.K.

Galleg, yezh nemeti...

Goude gwelout enebiezh Kengor al lezennoù ha diliaurioù ar gouarnamant ouz o c'hinnig menegiñ "an doujañs ouz ar yezhoù rannvroel" e mellad 2 ar Vonreizh c'hall, o devoa ar senedourien lamet o c'hinnig. Kavet e oa bet "didalvoud" menegiñ er memes mellad "yezh ar Republik" hag ar yezhoù "rannvroel". Koulskoude eo bet kemmet ar genou evit mirout a chifañ kizidigezh ar Waloned ha hini Kebekiz. "Yezh ar Republik eo ar galleg, e doujañs ar yezhoù ha sevenadurioù rannvroel" eo a oa bet kinniget gant ar senedourien. Evit e ziarbenn e tisklerias ar senedour Jacques Larché : "Nemaon ket a-enep ar c'hinnig met kavout a ra da gengor lezennoù ar sened eo didalvoud", rak, emezañ "n'eus den ebet o nach doujañ da liasseurted sevenadurel ha yezhel Bro-Frans". Michel Vauzelle, ministr ar Justis a lavaras ne gave ket "talvoudus skrivañ er Vonreizh pezh a oa diezhomm", hag a embannas ouzhpenn : "Gouzout a oar pep hini pegeñ pouezus eo ar yezhoù ha sevenadurioù rannvroel d'ar Challaoued ha petra a ra gouarnamant evit ar glad-se". Da zifenn ar c'hinnig e lavaras ar senedour Goetschy e oa meneget ar gwarez d'ar yezhoù rannvroel e boriezhioù Spagn hag Italia. Souezhus e kave ivez, emezañ, bezañ o tilienn, a-enep d'ar gouarnamant, ar savbont a oa "hini prezidant ar Republik e 1981, pa lavare neuze e oa ref reiñ ur statud da yezhoù Frans evit ma ne vije ket ar vro-se ken an hini dezveañ en Europa o nac'h gwirioù anavezet e pauremglevioù etrebroadel".

Villers - Cotterets nevesaat

Goude pennet ar c'hinnig e oa stad er senedour Paul Girod en abeg ma veze laket da dalvezout, er Republik penn-da-benn, embann Villers - Cotterets a oa bet ofisiellet gant ar implij ar galleg e 1939. Hervez Paul Alduy, Senedour a Norz Katalounia, "ma vez an holl a-du gant hon c'hinnig, n'eus kudenn ebet ken, gant ma vo degemeret doujañ d'ar sevenadurioù ha yezhoù rannvroel, elzaseg, brezhoneg, katalaneg..."

M.K.

Redadeg Pariz Barcelona evit Poblou Amerika

Eus ar c'hentañ a viz Even betek ar 24 a viz Gouere zo bet aozet etre Pariz ha Barcelona ur redadeg evit ma vefe anavezet gwirioù poblou indian Amerika. 3500 km d'ober, etre 54 c'hêr. Chomet eo a sav ar rederien e Kemper. En o zouez ur plach eus Bolovia, ur paotr eus Kolombia, eus Nikaragwa, Guadloupe, un indian Navajo ha tud eus Europa. Bep noz e tisplegont stad an traoù en o bro hag e roont da bep maer ur skrid testeni evit "gwirioù ha denelezh poblou Amerika". Ar redadeg a ro ivez an tu da lansañ ur c'hampagn sinadurioù evit ma vefe roet pris Nobel 92 evit ar peoc'h d'ar stourmerez Rigoberta Manchu ha dieubet Leonard Peltier, toullbac'het abaoe 15 vloaz er Stadoù Unanet ■



An Indianed o deus divizet stourm evit o gwirioù ha lakaat da anavezout o chudennoù en Europa

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdonioù Vilhan 29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur Skoazell adalek 130 lur

Kenavo Jean Michel Tilly

Jean-Michel Tilly 61 bloaz, prezidant POBL abaoe e groudigezh e 1982, zo aet d'an anaon d'ar 6 a viz Mezheven.

Abaoe pell e oa anavezet mat Jean-Michel Tilly en emsav. Er bloavezhioù '70 e oa prezidant Kreizenn sevenadurel Breizh Gwengamp. Kemer a reas parzh ivez e krouidigezh ar gelouenn "Evit ar brezhoneg". War an dachenn bolitikel e labouras ivez. En dilennadegoù rannvro diwezhañ

e oa war listenn "Pobl Breizh, ur bobl en Europa" en Aodoù an Arvor.

Kalz a dud, en o zouez un toullad mat a emsaverien a 'n em gavas e Gwengamp da gaverer e zouaridigezh d'an 10 a viz Mezheven evit lavaret kenavo d'un den en deus gouestlet e vuhez d'e yezh ha d'e vro.

Kenavo Jean-Michel.

Gw.C.



Y. Fouere, Jean Michel Tilly, P. Verbeke, A. Coviaux e-pad kendiviz P.O.B.L.

Darempredoù etrekeltiek

Ar c'hevredad "Mignoned Bro Galiv" en deus divizet reiñ un tamm skouzell da lwerzhoniz ar C'honemara evit diorren un armerzh touristel en ur zoujañ da binvidigezhioù ha talvoudegezhioù ar vro, hag evit stourm ouzh kinnigoù toullus ar bromotourien. Setu perak ez eus bet krouet un aerlinenn etre ar Roc'hall ha Shannon gant un ehan e Gwened. Ar pal : kas bep bloaz 1500 tourist kouchet e karantez gant bro lwerzhon.

Titour : "Mignoned bro Galiv", 2, stradae Octave Mirbeau 17290 Agrefeuille d'Aunis, pell. 46 35 02 00 pe 46 35 78 95.

Pontoù annezet

E-pad an hañv, e vo un diskouezadeg e Landerne diwar-benn ar pontoù annezet en Europa. Sallet e vez ouzh pont kozh Landerne evel an hini nemetañ en Europa gant tud o chom warnañ. Ha gwir kement-se ? E Landerne ar respont en hañv-mañ.

bremañ 130/131 - miz Gouere/Eost 1992

Staj livañ

Da vare Gouellioù Etrekeltiek an Oriant, eus an 3 d'an 13 a viz Eost, e kinnigo Skol Arzoù Kaer an Oriant ur staj «Arz ha Sevenadur e Breizh» e Galleg hag e Brezhoneg, war an tresañ, al livañ, ar c'hizellañ, an engravañ...

Gallout a raio ar vrezhonegerien dedennet gant an arzoù hag an teknikoù-se kregiñ ganto pe o feurzeskiñ, en ur gomz ar yezh a fell dezho.

Setu roll un nebeud goulennoù a vo studiet :

- al livourien e Breizh hag an dudoniezh : eus ar "folklor" d'ar soziologiezh ;
- an tres, tresañ hervez ar skwer, ar studiadenndesteniñ, tresañ un tamm bro diwar ar maez pe e kër ;
- al livañ e Breizh a-raok ar 17^{vet} kantved ;
- teknikoù kozh ha teknikoù nevez al livañ mogerel.

Koustañ a raio 1300 lur ar staj-mañ. Titouroù/enskrivadurioù : Skol Arzoù Kaer an Oriant, 9 ar Jules Legrand, 56100 AN ORIENT, pell. 97 21 01 30.

Distro ar Seizh Avel

Ur gevredigezh evit adlañsañ arz Bro Dreger

Daniel Thenadeg, bet perc'henn ar "Seizh Avel" e Konfort-Berc'hed, ha deuet da vezañ rann Kreizenn "Les Arcs" e Kewenn, en doa tapet ur barrad kleñved ar vro goude bozañ distro da Vro Dreger da reiñ ur priz da Varia Prat : tri c'hant abadenn en ur ober c'hwec'h vloaz a oa bet savet gantañ en davar "Ar Seizh", pa oa-eñ oc'h ober war-dro. Sonadegoù, kenstrivadegoù, stajoù, tolpadegoù abep seurt o vuhezkeat ar c'horn-bro. Roil an arzoerien pedet e Kewenn a ziskouez atav liessourtegezh interestoù an den, "spered ar «Seizh Avel»" e vefe, hervez D. Thenadeg, "gwiziennet-mat ha digor war an dro". Setu m'eo deuet da D. Thenadeg ha d'un nebeut mignoned dezhañ, arzoerien a Vro Dreger, ar mennozh da sevel ur gevredigezh sevenadurel, digor d'an holl, ha ganti ar palioù da genderc'hel ar c'houn hag ar spered a oa en davar "Ar Seizh Avel", da lâret eo skoulmañ liammoù gant an arzoerien hag an ostizien, skozellañ an oberiantizoù e-keñver sevenadur Breizh, broudañ ar groudigezh sevenadurel e Bro-Dreger : roet e vo bep bloaz Priz ar Seizh Avel d'un arzur pe d'ur strollad arzoerien, pe d'ur gevredigezh, a Vro-Dreger. Roet e vo ar priz evit ar wech kentañ ar bloaz-mañ da Julien Simon, aktour (Tregeriad I) hag oberour ar pezh choari «E-giz un ael goude ur maread a rouzaudigezh».

D'ar sul 23 a viz Eost e vo lidet an adkavidigezh e Konfort-Berc'hed gant ur pred o vodañ paeronen ha mignoned ar gevredigezh. Evit en emskriavañ : J.J. Henry, Bourk, 22260 Runan, pell. 96 95 00 09. Titour all : D. Thenadeg, Les Arcs, 56530 Kewenn, pell. 97 05 01 07 pe 97 05 04 45.

Skol Uhel ar Vro

O paoez embann un trakt nevez emañ Skol Uhel ar Vro, un trakt a renabl stajoù brezhoneg, sonerezh, dañs, c'hoariva, trevoniezh, chanterioù ha gouelioù brasañ an hañv e Breizh. Kavet e vez an trakt-mañ e tiez an touristelezh, kreizennoù sevenadurel ha tiez-kêr e Breizh. Ma ne gavit ket en ho pro e c'hellit e goulenñ digant Skol Uhel ar Vro, BP 66A, 13 str Belfort, 35031 Roazhon Cedex, pellgomz 99 38 98 88, pelleier 99 38 50 32.

15 vet Gouel Sinema Douarnenez 23-30 a viz Eost 92

Pobl Iwerzhon e Breizh

Goude Arborijenned Aostralia, e teu en dro Festival Douarnenez da Geltia, un nevezenti e gwirionez, rak diavaez da zevezh Breizh bep bloaz, morse n'eo bet gouestlet ur Festival a bezh d'ur Bobl Kelt. Iwerzhon eo a vo "star" Festival 92, hag evel ma vez lavaret ken brav er bruderezh "Deut oc'h evit Iwerzhon, dont a reoc'h en dro evit an Iwerzhoniz".



Robin Wright hag Aidan Quinn e-barzh "The Playboys", film Gilles MacKinnon a vo diskouezet evit ar wech kentañ e Douarnenez

Petra 'vo kinniget d'an dud etre an 23 hag an 30 a viz Eost ? Filmoù da gentañ evel just. Un daou ugent bennak o skeudenniñ Iwerzhon, an hini romantel, ar brezel ivez. Filmoù savet gant Iwerzhoniz o-unan pe gant tud diavaez. Tu a vo da d'framenn eus "L'homme Tranquilla" gant John Ford da "Hidden Agenda" (Ken Loach). O framenn dre "Reeler and the Model" (Joe Comerford). Ar roll zo hir evit ma c'hellfemp kinnig anezho holl, met unan diouto avat, e vo arabat deoc'h chwitañ "Hush a bye baby" un istor buhez a vremañ gant tud yaouank en Iwerzhon an hanter-noz. Bemdez e vo ur film dibabet a-ratozh-kaer evit ar vugale.

Kendivizoù, stajoù, sonerezh A dra sur n'ema ket Iwerzhon re bell

Titour : Festival Douarnenez pellg. 98 92 09 21 Erwan Moalg pe Karolin Trouin.

Plougerne, d'ar 1añ a viz Eost 1992

AR BASION VRAS E BREZHONEG PENN-DA-BENN

Nondendistag ! Petra a glav an ? Brezhonegerien a vefe ha na vellent ket bet o welet c'hoazh ? Biskoazh ! Un taol chafis diwezhañ o davo er bloaz-mañ. Arabat dezho c'hwitañ warnañ ! Ha meur a hini a oa bet warlene a yelo adarre er bloaz-mañ, kredabl sur ! Ma n'ho peus ket bet tro da welet Ar Basion Vras e Brezhoneg p'ann-da-benn warlene, gant Ar Vro Bagan, merkit diouzhtu nozvezh ar 1añ a viz Eost, ha degast dilhad tomm ganeoc'h da Blougerne : hir e vo an nozvezh er-maez, ha bras ar voem, me 'lavar deoc'h !

Ti eurvezh divent ha dispar, c'hoariva ha sonerezh, tan ha kurun, gant Ar Vro Bagan ha Christian Desbordes war aod Korojeñ Plougerne. Na vez ket c'hoariet alies seurt abadennoù e brezhoneg, gant kemend-all a dud war al leurenn (300 a c'hoarierien ha kanerien ha sonerien !). D'ar vrezhonegerien neuze da ziskouez e talvez ar boan krouiñ e brezhoneg.

Da ziwall a zo : en nozvezhioù all, e vezo c'hoariet Ar Basion Vras e "divyezheg" (gant 2/3 e brezhoneg menestra...) .

Setu roll abadennoù Ar Basion Vras evit an hañv : Landivizio (d'an 11/7), Kastellin (d'an 18/7), Kemper (d'an 22/7), Plougonvelen-Bertom (d'an 25 ha 26/7), Plougerne (d'ar 1añ a viz Eost e brezhoneg penn-da-benn, d'an 2 ha 3/8 mod all), an Oriant (d'an 8/8), Gwengamp (d'an 12/8).

Div bladenn arc'hant (pe diskoù lazer) Ar Basion a zeulo a-zindan ar wask e penn kentañ miz Gouere. Engravel warno div eurvezh sonerezh da vezañ selaouet er gêr, a-raok mont da Blougerne d'ar 1añ a viz Eost. Gant ho tilhad tomm.

Filip Ollio

Komzomp Brezhoneg

Staj brezhoneg ha kaial war vor, eus an 22 d'an 29 a viz Eost e Pempoull, e Ti ar re yaouank Kastell Kerraoul. Titouroù : 96 20 83 60

Kamp Katekiz evit ar Vugale

(6-13 bloaz) Dalc'het e vo e Rostran (skol kentañ derez an Itron Varia) eus ar Sul 2 a viz Eost betek ar sadorn 8.

bremañ 130/131 - miz Gouere/Eost 1992

D'ar 16 a viz Gouere, e Landerne

An Alar hag ar Stered, pezh-c'hoari nevez ar Vro Bagan

Ur pennad-kaoz gant Goulc'han Kervella

Da geñver Gouelioù Kann Al Loar Landerne, e vo c'hoariet pezh-c'hoari nevez Ar Vro Bagan, "An Alar hag ar Stered", evit ar wech kentañ. Troet eo diwar "The plough and the Stars" gant Sean O'Casey, da zanvez dezhañ buhez un nebeut tud e-kreiz toudmac'h an emsavadeg a oa savet da vare Pask 1916 e Dulenn. Bet eo Filip O'illo oc'h atersiñ Goulc'han Kervella, evit Bremañ, diwar-benn ar pezh-c'hoari-se a vo pezh-c'hoari "bras" Ar Vro Bagan evit an daou vloaz da zont.

Bremañ : Perak ho peus bet c'hoant sevel ar pezh-c'hoari-se?
GK : An dud a oa o c'houleñn e vije c'hoariet en-dro e brezhoneg penn-da-benn gant Ar Vro Bagan. Abaoe "Kenavo My Love" n'hon oa ket savet ur pezh-c'hoari bras e brezhoneg nemetken. "Ar Basion" a oa bet c'hoariet div wech warlene e brezhoneg penn da benn. Er bloaz-mañ e vo adarre, met abadennoù divyezhek galleg/brezhoneg a vez graet peurvuiañ ganti. Ahendall hon eus bet c'hoariet evel-just pezhioù-c'hoari e brezhoneg penn-da-benn, pe evit ar vugale pe evit an dud all, met berroc'h e oant. Setu ar c'hoant da gaout ur pezh-c'hoari bras e brezhoneg, en un doare c'hoariva klasel.

B : Perak bezañ kemeret d'ar poent-se An Alar hag ar Stered?
GK : Un nebeut bloavezhioù zo, em boa bet levrioù O'Casey gant Ivona Martin, eus Breizh, hag he doa lavaret din "Perak ne rafech'ket ivez bep amzer ur pezh-c'hoari eus ar broioù keltiek all?" Remi Darrien hag e strollad o deus bet c'hoariet meur a hini, ni n'hon oa ket graet, ha pa vafe traoù berr. Ha lennet em eus bet pezhioù O'Casey. Ha daou pe dri dreist-holl hag hemañ en o zouez, a bije kalz din.

Stag a-walc'h eo an istor ouzh istor emsav Breizh, a-raok hag e-pad ar brezel diwezhañ. C'hoanti o deus bet lod eus Emsav Breizh ober heñvel ouzh ar pezh a oa bet e Bro-Iwerzhon, a zeus da vezañ ur skouer evlio. Ouzhpenn-se, ur pezh-c'hoari brav, brudet-kaer dre ar bed-holl, ur vro getliak stag ouzhpenn, un istor plijus, ur skrivagner hag a oar kas ha boueta an istor eus ar penn kentañ betek ar penn diwezhañ, ha diskriavañ brav an tudennoù. Ul labour talvoudus neuze evit ar c'hoarierien, e-keñver c'hoariva :

ar pezh-c'hoari, frammadur ar pezh-c'hoari, hag ivez, personelezh an tudennoù-se. Setu perak hon eus dibabet An Alar hag ar Stered.
B : E brezhoneg penn-da-benn neuze.
GK : Ya. N'eo ket un droidigezh ger-hager. C'hoant am boa da implijout brezhoneg yac'h hag a c'hellje bezañ komprenet war ar maez. C'hoant hon eus gant ar pezh-c'hoari-se da sachañ muioc'h tud ar vro da zont da welet c'hoariva. Klasel hag aes a-walc'h eo an istor. Bez e c'hell plijout da dud ar vro, ha n'eo ket da dud an Emsav nemetken. Hag ar yezh am eus lakaet ennañ a zo ur yezh pemdeziek. Pinvidik, met pemdeziek.
B : Un doare c'hoariva klasel, az peus lavaret bremañ?
GK : E Kenavo My Love, pe bPerrot, e oa marteze ur spered diaesoc'h evit tud ar vro, dezho d'en em dommañ pe da brizañ seurt pezhioù, a c'houzomp ez int memestra diaes a-walc'h evit tud n'int ket kustum ouzh seurt traoù. Pa raemp pezhioù c'hoari berr, war ar maez, e veze aesoc'h dezho da gompren anezho. Hag amañ em eus klasket kemer ur pezh-c'hoari bras, hir, ha lakaet ennañ ur yezh hag un doare c'hoariva hag a vije aesoc'h marteze d'an dud-se da brizañ.

B : Sonerezh a vo klevet er pezh?
GK : Kanaouennoù a vezo, pe eus Bro-Saoz (arme Bro-Saoz), pe eus Bro-Iwerzhon. Hag aze hon eus goulnet gant Paskal Gwiader dont ganoemp da ganañ, n'eo ket nemetken kanañ etre ar pennadoù, met bezañ c'hoari-kaner. Rak ur c'haner lañsus eo hennezh, hag a c'hoari ar pezh a gan. Trouzioù brezel a zo ivez. Ne vezo ket diskouezet war-eeun an emsavadeg, met buhez ur guchenn dud, o vevañ er memes ti, pe dost, e Dulenn, damdost eus an ti-post, al lec'h m'eo bet ar gwashañ etre emsaverien Bro-

Iwerzhon hag an arme saoz.
B : Hag an dud, just a-walc'h?
GK : Kontet e vezo buhez an dud-se, e-kreiz tan ha kurun an dispac'h. Gwelet e vezo evel-just an darvoudoù war o zro, lod anezho o kemeret perzh enno. An Haroz, ma c'heller lavaret, daoust ma'z eus bet skrivet ne oa haroz gwir ebet e-barzh ar pezh-se, a zo unan eus ar Citizen Army (dezihi da arouez un alar ha stered), Jack Clitheroe e anv, hag a zo o vont neuze da gemeret perzh en emsavadeg. E vaouez Nora, hag he deus kalz a garantez evitañ a garje e chomfe er gar e-lec'h mont da gemeret perzh en Emsav. Ha daoust d'ar garantez-se, ez a d'an emsavadeg. Lazhet e vezo. Hag e vaouez a gollo he skiant. E-giz e broioù ar c'hreisteiz emañ an dud o vevañ e-barzh an ti-se. Digor e vez an nor atav, hag an holl dud a gustum dont e-barzh. O chom en ti, neuze, ur c'henderv d'ar vaouez-se, hag a zo kentoc'h ur c'houmouner. Lod a lavar e vez a-wechoù mennoziou O'Casey o tont er maez eus e'chenou. Willie Covey eo e anv. Un eontr kozh dezhi, Peter Flynn, a zo ivez o chom e-barzh an ti-se. Gwiskañ a ra e zilhud folkloral da vont d'ar meeting, d'ar manifestadegoù... Un den all ivez a zo, Fluther Good, anezhañ ur c'halevez. Ha mer'ched, ivez : Bessie Burgess a zo a-du gant Bro-Saoz, hag a vez o kanañ Rule Britannia, ha God Save The King, ha bez eo eus an amezogez all, Miss Cogan. Ha Flosie Redmond, anezhi ur plac'h-noz. E-kreiz an trubuilhoù e vez gweliet an dud-se eus ar penn kentañ betek ar penn diwezhañ. Ar braz diouto, ar wazed dreist-holl, a zo tud aonik, brabañserien, hag en em ziskouez evit ar manifestadegoù. Met pa greg ar brezel, e chomont pell diouzh an tan. Ha mont a reont da brizañ zoken ar stalioù a zo kroget an tan enno.

Dudi



Pezh-c'hoari Sean O'Casey c'hoariet gant Strollad ar Vro Bagan

B : Gwall skrijus eo, evit doare !
GK : Skrijus eo a-wechoù. Marvel a ra kalz a dud, met kalz a fent hag a c'hoarzh a zo barzh ar pezh-c'hoari-se. Daou pe dri bennad skrijus a zo. Miss Burgess, an hini a zo a-du gant Bro-Saoz... Hi hec'h unan a vezo gweliet e penn kentañ ar pezh-c'hoari evel ur gwall vaouez, a deuo da vezañ, er penn diwezhañ, ur santez, koulz lavaret, ur vaouez hag a ra kalz a vad en-dro dezhi. Setu, kontrol eo ar pezh a ziskouez O'Casey diouzh ar pezh a c'helle soñjal an dud, er vro-se.
B : Piv oa Sean O'Casey ?
GK : Ganet eo e Dulenn, en ur familh paour, labourerien. Marvet dazhañ e dad ez yaouank, setu en deus bet ur yaouankiz diaes, e-touez micherourien ha labourerien. Klaf e oa ouzhpenn, ez yaouankik, gant e zaoulagad, ne vefe ket gwall sklaer. En emdroet eo war-zu emsav al labourerien, ha kroget da labourat evit bezañ micherour d'e dro. Lar'kin ha Connolly a oa e dud veur e-pad ur pennad. Tud hag a soñje e oa ret diubiñ ar vro evit diubiñ al labourerien. Pezh n'eus ket bet e Breizh... Bet eo bet ivez war-dro an

emsav sevenadurel, war-dro ar gouezeleg. Bet sekrelour ivez e-barzh an Irish Volunteers, ur strollad savet evit difenn ar vicherourien pa veze manifestadegoù. Ar strollad-se en doa kemeret perzh da c'houde e-barzh emsavadeg 1916. Un tammig e oa bet fallgatonet O'Casey, ma'gav din, war-dro ar bloavezh 1914. En em dennet eo neuze diouzh an Emsav politikel, evit en em lakaat da skrivañ, hag en deus ehanet ivez e labour micherour ha sindikalour evit en em lakaat da vat da c'houde e vara o skrivañ pezhioù-

c'hoari hag a zo bet c'hoariet azalek ar bloavezhioù 18 pe 20, en Abbey Theatre, gant Yeats. En em dennet kuit diouzh Bro-Iwerzhon da c'houde. Atav e chomo e oberennoù stag ouzh Bro-Iwerzhon, ha kudennoù broadelour Bro-Iwerzhon.
B : Ha penaos eo bet degemeret ar pezh e Bro-Iwerzhon?
GK : Rat eo gouzout e oa bet kalz a freuz, d'ar poent ma oa bet c'hoariet ar pezh c'hoari-se, en Abbey Theatre, e Dulenn, e 1926, rak O'Casey, hag a oa en em dennet diouzh an Emsav war-dro ar bloavezh 1914, a ziskouez ennañ an traoù en un doare na vez ket menlus atav evit an emsaverien, nag evit pobl Iwerzhon : tud mat d'en em zispakañ dirak an dud, met pa veze tan, pa veze bec'h e sachent o skasoù ganto. Degemeret fall eo bet dreist-holl gant ar re o doa kemeret perzh, gant ar re a oa marvet tud dezho e-pad an darvoudoù-se, hag e-pad ar brezel a zo bet war-lerc'h.

Evit ho kelaouiñ,
evit ho servij,
24e/24e
KELAOUENN
Kazetenn delematek divyezhek
36 15 KELA

B : Fiziañs a zo da gaout memestra ne vo ket kemant a freuz gant an dud a yelo da arverstiñ ouzh AN ALAR HAG AR STERED, d'ar 16 a viz Gouere, e Landerne !

Sonerezh

Sonerezh gant The Pogues, Gwerz, Stivell, Manu Lannhuel ...
Ha teir fezh-c'hoari nevez e Brezhoneg

Gouelioù Kann al Loar Landerne 92

*Deuit 'ta, tudoù gaezh, da Landerne etre ar 15 hag an 19
a viz Gouere, n'ho po ket a geuz, me 'lavar deoc'h !
Kement ha lakaat ac'hanoc'h da lipat ho mouroù, setu un
tañva eus roll meuzioù gouelioù Kann al Loar 92*

D'ar Merc'her 15 a viz Gouere, da 9e noz, un abadenn na vo ket tu da ankounac'haat, nemet ha beuzet e vo ar soñj anezhi en un donnellad Korev : Gwerz, distro (betek peur ? hastit buan dont d'o gweliet araok na savo keuz deoc'h !) evit hor brasañ dudi. Ha ne vo ket peurlbaget o vinnioù gant padred Gwerz pa vo gweliet ar strollad iwerzhonat brudet-kaer The Pogues, o pignat war leurenn Landerne evit o abadenn nemet war an douar-bras en hañv-mañ ! Gwelit ha klevit ! Priz an nozvezh : 125 l (feurm) ha 140 l (war an dachenn). Ha ma n'oc'h ket re skuez, fest-noz gant Kantnerien, Kanerezhed Sizhun, Pepe-Max.
D'ar Yau 16 a viz Gouere, pezh-c'hoari nevez Ar Vro Bagan e brezhoneg penn da benn, c'hoariet evit ar wech kentañ : AN ALAR HAG AR STERED (sellit ouzh ar pennad

gouestlet d'ar pezh-se). D'ar memes poent, un abadenn gant tud yaouank donezonou enno ha dazont dirazo, na petra 'ta : Anna ar Signor (telenn geltiek) ha Denez Prigent (kan e brezhoneg). Ha goude-se, ur fest-noz gant sonerien yaouank : Sunerien gwad, Bikozh (Simon-Molard)...
D'ar Gwener 17 a viz Gouere, Kanadeg Kan evit ar peoc'h, kanet e brezhoneg gant 200 krist eus meur a laz-kanañ ha muzisianed Laz-Seniñ Broklilien. Sonerezh gant René Ajean, testennoù gant Job an Irian. Ha fest-noz vras mod kozh gant ar Vreudeur Morvan, Kemener-Gwilhou, Molard-Bihan, Ar Re Yaouank. Dañset 'vo ken na strako !
D'ar Sadorn 18 a viz Gouere, da 6e noz, pezh-c'hoari brezhonek nevez Teatr Brezhoneg Penn Ar Bed : «benn arc'hoazh 'vo deiz c'hoazh», gant

Gwilhou Kergourlay. Leurennet gant Bernard Loti. Ha sonerezh da 9e noz, "Rue de la Rade" gant Manu Lannhuel heuliet gant muzisianed anavezet-kaer (Molard, Pellen...). Ha war e lerc'h, Alan Stivell, na oa ket tremenet dre Landerne abaoe 1971 ! Ouzh an delenn e c'hoario Alan e-pad ur frapadig. Ha goude-se e teuo e vandennad da seniñ asambles gantañ. Un abadenn ar seurt na vez na klevet na gwelet allies. Evit 65 l (feurm) pe 100 l (war an dachenn). Hag ur fest-noz, mar plij, gant BF15, Diaouled ar Menez, ar C'hoarezed L'Hour.
D'ar Sul 19 a viz Gouere, owerenn e brezhoneg, e-giz ma vez lidet e Landerne meur a wech e-pad ar bloaz bremañ. Diouzh an abardaez, gouel distro an Dalc'hmat, bag mod-kozh nevez-flamm Landerne a vo bet o lovel etre Brest ha Douarnenez : boued ha kanaouennoù martolodad gant Michel Tonnerre, Gwelan... Ha da lakaat ar sardinad da ziskenn, ur fest-noz gant Daouarn, Penngolo, Paol ar Gall.
Hag evel bap bloaz, gouel ar vugale, kenadenn artizanet ha kevredigezhioù sevenadurel, trouz ha sonerezh er straedoù gant muzisianed, Strollad Plougin hag e bezh-c'hoari straedoù e brezhoneg... "Fiko Antwan".
Kann al Loar Landerne, e-giz ma welit, an hini brezhonekañ (n'eo ket diaes, emit-hu !) e-touez festivoù an hañv. Da c'houde hepken, ho po aotre da vont da gaout un nebeut devezhiou diskuzh... da Skaer da skouer...
Filip Ollio

Ur bladenn nevez eus Euskadi an Hanternoz

PEIO SERBIELLE

Ur vouezh don, tomm ha leun a gronn ha kalon (par da hini ar c'hatalanad Luis Llach eme lod). Ur sonerezh ec'hon o lakaat ho kwazioù da driddal a-gavret gant lavar euskarek Peio Serbielle. Peio Serbielle zo a orin eus Kornbro Maule (Euskadi an Hanternoz). Ne c'helle ket Peio Serbielle reiñ kerañ testennoù d'e yezh ha d'e vroad.
Dalc'h soñj eus e anv, komzet e vo diwar-e-benn er bloavezhioù da zont.
Daveñn ar bladenn : Peio Serbielle e ti Polydor.

Emgavioù sonerezh kozh 17 ha 18 a viz Here '92 e Dinan

Emgavioù Sonerezh Kozh, d'ar 17 ha d'an 18 a viz Here e Dinan
A.R.C.O.D.A.M., Kevredigezh Rannvroel o Kenurzhiañ Diorroadur Oberiantiz ar Sonerezh hag an Dañs, a aozo evit ar pempvet gwech Emgavioù Rannvroel ar Sonerezh Kozh, eus Sadorn 17 d'ar Sul 18 a viz Here 1992, e Dinan.
ARCODAM, 1 str Prieure, 35410 Kastelliron, pellgomz 99 37 34 58, pe pellletier 99 37 37 62.

"Gouelioù er c'hastell" a vo aozet ivez evit an seizvet gwech er bloaz-mañ, a-benn brudañ arzourien ha glañ ar vro war an dro.
Lec'hioù an abadennoù:
Kastell Plessis-Josso, e Teiz (56), d'ar Gwener 17 a viz Gouere, Gilles Servat hag an Triskell ;
Mogerioù-kreñv Dinan (22) d'ar 24 a viz Gouere : Kerlenn Pondi ;
Domani La Billardais, Karozh (56) d'an 19 a viz Gouere : sonerezh hengounel.

"Celtic"

Ur bladenn evit an SNSM gant arzourien Breizh



An arzourien bodet e Kemper evit lakaat ar bladenn "Celtic"

Un devezh, kostez Cherbourg, e oa c'homzet ar son-Aozour Jean Didier Gaudry, 14 eurvezh war ur vag vihan e kreiz ar mor dirollet. Saveteet e oa bet gant an SNSM. Dek vloaz war-lerc'h n'en deus ket disoñjet frapad aon e vuhez ha divizet an deus moulañ ur bladenn ha reiñ an arc'hant d'ar gevredigezh saveteiñ an dud war vor.
Gant dek mignon en deus Jean Didier Gaudry savet ar gevredigezh "Ciré jaune" ha staget gant al labour. N'eo ket anat bodañ war ur bladenn kement a ganerien ha muzikourien disheñvel, tapout ar gwirioù digant an tiez pladennoù hag all... Deuet eo da vat rak den ebet n'en deus nac'het ha 18 arzhour eo a zo en holl.

Sonerezh a vor eus an dibab.
"Divizet zo bet bodañ arzourien disheñvel, lod anavezet mat, lod all

Kendalc'h Keltiek

Kendalc'h Keltiek 1993 a vo graet e bro Skos en Inverness 26/31 a viz Gouere 1993 war an danvez "Celtic Youth Participation", da lavaret eo e vo gweliet petore perzh a vez kemeret gant ar yaouank (er vuhez sevenadurel ha broadel) er broioù keltiek.
Digor eo ar c'hendalc'h d'an holl. Er skoll veur e vo ar c'hendalc'h. Met n'ouzer ket re penaos e vo evit ar

nebeutoc'h" a zispleg J.D. Gaudry. "Flet e oa kavout Kanaouennoù a zivout ar mor evel-just, sur a-walc'h hon eus disoñjet tud, met den ebet n'eus nac'het kemer perzh".
E kreiz miz Even ez eo en am gavet lod eus an arzourien e ti Gweltaz ar Fur er stal "Ar Bed Keltiek" e Kemper. En o zouez Melaine Favennec, Dan ar Bras, Claude Besson...
Ar Bladenn "Celtic" a zo dija e toues ar gwerzhioù gwellañ ha peadra zo da soñjal e raio berzh e-pad an hañv.
"Celtic" gant Melaine Favennec - Dan ar Bras - Serge Cabon - Patrice Marzin - Glaz - Claude Besson - Roland Becker - EV - Alan Stivell - Etienne Grandjean - Alain Pennek - Gilles Servat - Carré Manchot - Bleizi Ruz - Gwendal - Tri Yann - Bagad Lann Bihou - Soldat Louis.

bloavezhioù da zont, rak kaoz a zo da werzhañ an tiez-lojañ eus ar skoldi meur d'ar prevez. Diaesoc'h e vo neuze da aozañ ha keroc'h kredapl.
Ur c'hinnig a zo bet graet gant skourr iwerzhon da sevel ur geriadur er c'hwec'h yezh keltiek eus gerioù aes. A-benn ur bloaz e lefe bezañ embannet.

Loik Chapel

Dudi

Livour

Al livour Morvan Leguedes a ginnig e daolennou en e stal-labour an Tirañ en Ospital Kamfroud eus an 18 a viz Gouere betek an 9 a viz Eost 1992.
Digor e vez bemdez adal 14e betek 20e
Danvez an diskouezadeg a zo :
"Gouelioù, Dec'h, hag Hiziv"
(Bigi Lennvor Vrest)
50 taolenn nevez-graet.

Dañs

Dispac'h ar Bonedoù-Ruz d'ar Gwener 17 a viz Gouere da 9e g.m e Maner Kahoas-Pornaleg (e-kichen Pont-n'-Abad)
Son ha Goueleter gant ar Strollad dañs Tamm Kreiz
• Korollouriezh : Soaz Jolivet Aline Le Fur
• Sonerezh : Dan ar Braz Davy Spillane sonerezh hengounel.

• Kanaouennoù eus ar Barzhaz Breizh kanet gant Louise Ebrer.
• Abadenn korolladeg diwar-benn dispac'h ar Bonedoù Ruz. Spontus eo bet an darvoudoù-se e Bro ar Vigoudenned. Un dagadenn greñv oa bet war-lerc'h stourmadenn ar bobl : 6 tour-hiz distrujet : Kombird, Lambourg, Lanvern, Sant Honoré, Langivoua, Tregenneg. Ur lodenn eus hon istor zo da vezañ anavezet.



Dispac'h ar Bonedoù Ruz

Levriou nevez

Prizoniad er Ruhr

Gant embannadurioù Hor Yezh eo deuet er-maez ul levr a blij d'an holl : lenn a-hvorennoù Yann-Loeiz Emili bet prizoniad er Ruhr e-pad ar brezel 14. "E Klader e voe ganet Yann-Loeiz Emili er bloaz 1884. Goude marv e dad, e 1901, e reas war-dro douaroù an tiegezh gant e vreur Saig. Kemer a reas neuze perzh, hag eñ labourer-douar, e krouidigezh Sindikad Kastell. E 1912 ez eas da ober war-dro pajennoù brezhonek ar C'hourrier du Finistère renet gant e vignon Kaourintin An Ourz. Galvet e voe e miz Eost 1914 da vont d'ar brezel. Kavout a reas e vreur Saig en 21'vet Rejmant. E-kerz emgann Bapaume e voe lazhet Saig ha prizoniad er Ruhr, o labourer war-dro ar puñsoù glaoù-douar. Da Nedeleg 1918 e tistroas da Vreizh ha bloaz goude e chadavas e bost-labour er C'hourrier. Mervel a reas d'ar 27 a viz Here 1927". E a-hvorennoù-brezel eo "Prizoniad er Ruhr". Embannet gant bet, evit ar wech kentañ, war ar C'hourrier du Finistère, Hor Yezh, 1, plasenn Ch. Peguy, 29260 Lesnevén.

Deizlevr

"Ur bloavezh e Kemper, Genver-Eost 1948" gant Youenn Olier. Da brenañ 90 lur e ti Imbourch 56230 Kistreberzh. 192 p.
Kavet e voe an deizlevr-mañ kendalc'h un istor eus an Emsav goude ar brezel, ha peurgent hini an arnod da adsevel ur "strollad broadel" er bloavezhioù-se. Gwelout a reomp Youenn Olier oc'h ober meneg eus kudennoù a zo bepred re an emsav hiziv an deiz, hag o reiñ ar soñj a oa e hini war o divoud d'ar marese.
Plijus eo al levrenn-mañ da lenn : a zeiz da zeiz ez eus meneg eus an emsaverion a gejas ganto d'ar poante-se, evel Per Denez, Gagnepain, Yann Ezel, Alan Al Louarn, Ronan Huon, Visant Seite, F. Falc'hun... Evel-se e vevomp em-dro darvoudoù bihan ha bras an emsav hag ar bed a-dreuz an notennoù kemeret ingal bemdez gant un emsaver a ouestlo e vuhez dreist-holl d'ar preder politikel. Reiñ a ra evel-se un testiñ a zo dizoberus d'an neb a glask ar wirionez en emsav, hag a gav mat -ha rei- e vefe kaset war-raok an "Imbourch"-se an yor Yezh.

Geriaoueg diazez ar Vuhez Foran

Brezhoneg, Evel just !
Ar brezhoneg er vuhez foran... A-du emañ an holl bremañ gant ar goullenn-mañ. Ret e oa kinnig dielloù resis hag aas da implijout evit lakaat ar mennad-mañ da zont da wir. A-benn respont d'ur goullenn o vont war greskiñ e stag ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-heñchañ gant embann un heulad geriaoueg. Al levrig kentañ-mañ a ginnig kant ger diazez evit ar strollagezhioù lec'hel. Termoù eeun hag anavezet mat c'hoazh ez int. Evit 15 anezho avat ez eus bet lezet un dibab etre div droidigezh d'ar re a raio gant ar c'heriaoueg-mañ. Kevatal-rik e vez an troidigezhioù-mañ a-wechoù. Gwechoù all e vo dibabet hervez al lec'h ma vo ar panell. Gant kalz a aked eo bet priented al levrig-mañ gant Skol-Uhel ar Vro. Spi hon eus e vo assaet gantañ, war verr dermen, ar stalian panelloù divyezhek, helenn, kenglotus hag eledus. War meur a gantad gerioù all he deus labourer ar Greizenn enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-heñchañ. Evit gouzout hiroc'h : Ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-heñchañ Skol Uhel ar Vro (15 lur an tamm) B.P. 66 A 35031 Roazhon Cedex pg. 99 38 98 88, faks 99 38 50 32. Embannet eo bet al levrig gant skoazell Kuzul-Departamant Penn ar Bed.

Da rakprenañ e ti Al Liamm

Betek ar 15 a viz Eost 1992
Geriadur Ar Skrivagnerien ha Yezhourien Vrezhonek aet da anaon a-raok Mae 1992
Oberour "Un Siècle de journaliste Breton", bet embannet e 1981, hag a zo sellet evel al levrig-diazez war an danvez, en deus divizez impliji, ar wech-mañ, hor yezh broadel evit sevel Geriadur Ar Skrivagnerien Vrezhonek. En oberenn-mañ en deus L. Raoul (Falch Tremel) graet ar roll eus an holl oberourien aet da anaon, romantourien, barzhed, yezhourien, saverien kanaouennoù... adalek lvenet Omnes (XIVvet kantved) betek bremañ. Evit pep hini anezho e ro un danevell-vuhez resis hag ur roll klok eus o skridoù (levrioù, kanaouennoù, pennadoù ar c'helaouennoù...)
Ul levrig a bouez, ennañ 400 pajenn ha 60 politred diembann an darn vrasañ anezho, ha ne c'hell brezhoneger desket ebeñ diouer.
Priz : 120 lur betek ar 15 a viz Eost 1992, 150 lur goude J. Quélé, 20r. Petit Tiroireux, 22200 Gwangamp.

Lenn al liamm

Skrivañ da AL LIAMM
16 straed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -
Koumanant bloaz 150 lur (studierien, tud dilabour 100 lur)
Kaier vakañsoù

Live 2 - "War hent ar brezhoneg". Embannet eo bet ar c'haier-kaer-mañ gant ar Falz evit ar vugale prest da studiañ un tamm brezhoneg gant plijadur e-pad o vakañsoù-hañv. Kinniget brav eo ha tresadennoù Stefan Bervas a blij sur d'ar re yaouank.
Gant skoazell Kuzul-Meur Penn ar Bed eo bet embannet al levrenn, ha posubl eo kaout anezhi e doare-skrivañ peurunvan.
Skrivañ da Ar Falz-Skol Vreizh, 20 str Kerako, 29600 Monplouez.
40 lur an tamm + 10 lur ar c'haierig "diskoulm ar poelladennoù" + 15% Irapoù-kas (menegit "e peurunvan" war ho lizher-gourc'hennet).

Klask

Deuet eo er-maez eil levrenn kazetenn kreizenn klaskerezh keltiek Skol-veur Roazhon II, digoroc'h an niverenn-mañ, hervez Lukian Kergoat, rener ar greizenn, "war tachennoù... eus ar vuhez kevredigezhel, emdroadur ar vuhez politikel pa ne ve ken".
Kavet e vo war roll ar pennadoù-skrid ur studiaden gant Ronan Ar C'hoadig diwar-benn boked ruz Breizh izel, kinnigadur gouel sinema Douarnenez, un nebeut pennadoù o plediñ gant ar stervadurezh pe al lec'havadurezh, pe c'hoazh "Ar brezhoneg, eus Stivell da Ziwan".
Klasket eo bet gant ar greizenn eta, e-giz hen embannont, e istor ar yezh "an alchweziou a c'hall displegañ he stad a-vremañ a-benn digeriñ dezhi ivez d'ar amzer da zont".
Klask, eil levrenn, 65 lur, digant Presses Universitaires de Rennes, 6 ball G. Berger, 35043 Roazhon Cedex.

Sport Ar Gouren

Embannadurioù Skol-uhel ar Vro - 50 Lur an tamm (Eil trimiziad 1992 -Troidigezh e brezhoneg gant Fulup Kloareg)

Empennet ha savet a-stroll gant Kevredad Gouren ar F.A.L.S.A.B. ez eo bet embannet al levrenn-mañ gant Skol-Uhel ar Vro evit ma vo anavezet ha karet ar gouren, sport kaer ha poblek ma'z eo, a orin kozh meurbet emae hiziv o nevesaat ervat hag o ledanaat buan e dachenn.



Yaouankiz ur sport kozh

Daoust ma'z a war-raok dinech ha m'en bruder mat, e van ar gouren nebeudik anavezet ; e Breizh zoken, e vro dezhañ a-unan koulskoude. Kompren a ra unan neuze na pegement a labour zo war ar stern a-benn an dazont.
Stank-meurbet eo ar re o deus klevet komz diwar-benn ar sport hengounel-mañ, hep bout evelkent evit kontañ deoc'h tra pe dra diwar e reolennoù diaz pe e zoarsoù-ober. Chom hep menegit ervat ar pezh zo anezhañ n'eo ken leuskel an dud gant o brizhmennozhioù a ra eus ar gouren ur gozhigell a bleustr, mod kozh ha warlerc'hiet, mat da ankounac'haat e-barzh ur mirdi pe ur c'halarvez.
Ni n'omp ket evit gouzañv kement-se !... Ha n'omp ket, peogwir ez eus gant ar gouren hiziv kement a berzhioù hag a binvidigezhioù e-talil d'ober anezhañ ur sport poblek hag a-vremañ.
Lakaat ar muiañ a dud ar gwellañ, hag ar yaouankizoù dreist-holl, da anavezout ez eo gouest ar gouren da zegas dezho ar perzhioù o deus int ar gwir da c'houlenn digañ ur sport, eo pal ar re zo e karg eus ar renerezh hag eus ar skignerezh. Sport evit an holl, ez eo pinvidik e meur a gaefer : e dekneg, e niver bras a daolioù liessurt, a daolioù-difenn hag a daolioù-peg. Evit paotr ar sport eo ivez un doare-

stummañ korf ha spered eus ar re wallañ. Ar bismigerien, ouzhpenn, a vo rediet da anzav ez eus en e dro-spered lealded ha savendad : ha se, hep kontañ an holl c'hourenadegoù liessurt zo ar bloavezh-pad ken niverus ha plijus an eil hag eben.
Hogen, ma vez lakaet penn da uhelaat ar gouren betek dezhañ dont da vout ur sport klok ha kempad a dro-spered, arabat disnac'h e istor hag e orin. Doujañs ouz ar tremened hag ezhommoù ar vodernelezh o deus bet gouezet en em gemmeskañ, evel m'o deus bet gouezet ar c'hourennerien ober drouz an emdroadur koulz ha diouz an hengoun. Aet int tre, kos, da heul all an Doktor Kotonneg, diazezeur ar F.A.L.S.A.B. (Kevredad Kanelled ar Gouren hag ar Sportoù gourened breizhek) : "E-pliou ar yaouankiz emañ an dazont hag an tremened eo e ziaz" (Soñjennoù eur c'hemenad - 1935).
Bremañ pa'z a war hiraat amzer ar plijadurezhioù war hon bed, ez eo d'ar gouren en em reiñ da dalveout... Hag e raio...
Lakaat ober anaoudegezh ha karout ur sport hengounel ken kaer eo star hon levrenn. Ra oulo homañ neuze mont betek he fal, ha gwell c'hoazh zoken, ra bego choant gouren diwarni e darn eus he lennerien.
Paol ar Youkour

Breizh ha Broioù keltiek E koun Leon Fleuriot

Aet da anaon e 1987, bet kelennet e Skol-veur Roazhon hag e Skol ar Studioù Uhel e Pariz, en doa sevenet hag embannet Leon Fleuriot labourioù brudet ha pouezus (Geriadur ha Yezhadur an Henvrezhoneg, Orinoù Breizh h.a.)
Klasker a dalvoudegezh bras, istorour deuet da vezañ ur mailh war ar yezhoù keltiek, kenlabourer da veur a studiaden, e labourer L. Fleuriot kement war dachenn an istor hag ar yezhoniezh. Eil levrig-mañ hag en daou ugent a benadoù-skrid kinniget emañ e tiskouez e genlabourerien, skoldi ha mignonad o zoujañs evit ar mastr war ar c'heltiegezh a oa eus L. Fleuriot, ken gouziek, ken hagarat ha dloroc'h.
Ul levrig 560 pajenn, niverannet, da rakprenañ a-raok an 20 a viz Gwengolo, 240 lur an tamm, mi 30 lur mizou-kas, digant G. Ar Menn, 6 str Lapicque, 22000 Sant Brieg.

Nozvezh ar sonerezh

Zvet nozvezh ar Sonerezh a vo e Kerlouan d'an 22 a viz Eost, eus 6eur noz da gouloù-deiz : Annie Ebrél, Stovan, Skolvan, Carre Manchot, ha Perilimpin Folk evit ar wech nemeti e Breizh ar bloaz-mañ. Deuit niverus !

Torkad 1942-1992

Ul levrennenn pennadoù biskrivet a-zivout dizoladur Amerika eo an Torkad kentan-mañ, 33 fajennad en holl.
Kavout a reer dreist-holl :
-Baaj Vras Kristol Kolomb, a-zivout buhez ha beajoù ar mardour.
-Reveuzi En Amvevad, diwar-benn eledoù an dizoladur war hon buhez-ni.
-Brezelioù Meurad, a-zivout levezon donedigezh an Europeoiz war an havroiz.
- Skarzhdigezh Yuzevion Spagn, a c'hoarvezas ivez e 1942, diwar-benn istor ur boblañ hag ur rejlijon diazezet er vro a-raok amzer ar C'hrist, ha skubet kuit gant politikerezh paouristenaat roueed Spagn.
E gwerzh 30 lur e ti an embanner, M. Kerrain, 42 str al Lireu, 35136 Sant Jakez al Lann.
Torkadoù all a vo lakat war ar stern hervez an degemer a vo graet d'an hini kentañ.

Ur prof da z-Diwan eus perzh Kembreiz yaouank

Degemeret o deus Morwenna Jenkin ha Gireg Konan, a oa eno en anv Diwan, ur chekenn a 100 lur saoz digant studieren Aberystwyth a oa en o soñj sikour Skolaj Diwan Kerchoff da wellañ levraroueg ar skol. Root eo bet ar chekenn e-kerz dibenn-sizhun Bwrlwm Breizh a oa bet aozet gant Kevredigezh Breizh-Kembre.

Aozet e vo ur staj brezhoneg gant An Oaled e Treglonou, eus al Lun 10.08.92 da 11 eur d'ar Sadom 22.08.92 da 15eur.

Digor eo ar staj d'an holl, forzh pahini e vele o live brezhoneg. Bez e c'hell an dud dont gant o familh. Kinniget e vo d'ar berzhidi, 4 live brezhoneg (marteze 5), dre 6 frapad un eurvezh, gant 2 gelenner war bep live. Diouzh an abardaev, sport (kanoe, gwaregaf) pe pourcenadennoù, diouzh an noz, beilhaedegoù, c'hoarioù. Diskleriet e vo an diwallerezh evel kreizenn vakañsoù. Gant monitourien e vo ar vugale eus 8a 45 betek 8a noz. Priz ar staj : klok 2000 L ur sizhunvezh 1200 L Kreizenn vakansoù : klok 1400 L ur sizhunvezh 800 L. Enskrivadurioù da gas d'an Oaled 29870 Treglonou.

Ganidigezh

Chantal Tessier ha Serj Richard a zo laouen o kement deoc'h eo deut war ar voull douar patatez-mañ o mab Morvan d'an 28 a viz Ebrel gant e 9 lur a bouez hag e 55 kantimetrad a vent !!!

Ur marc'h houarn kantvloaz

Emañ Jean-Pierre Ledunois, eus Bohal (e-tal Malaestreg) o werzhañ un iskis a varc'h-houarn a zo bet gwelset (hag esael) gant lod ac'hanoc'h marteze e Gouel ar Brezhoneg.

E 1892 eo e ijinas an Danad Mikael Pedersen e varc'h-houarn, disheñvel diouzh ar re all, gant un dibr a-istritbilh, ur forc'h hir hag ur starn uhel.

Graet e voe 10 000 eus ar marc'h-houarn-se etre 1900 ha 1917 e Bro-Saoz, e kêr Dursley, e kontelezh Gloucester. Aes e veze kavet an dibr gant ar merc'hed, en abeg da stumm an dibr, aesoc'h ouzhi hini o c'horhoù, evit doare.

Ouzhpenn an aez e oa an tizh ivez : 32 km en eur e voe graet e 1900 evit ar wech kentañ war un tennad-hent a 161 km. Pa soñjer pegen fall e oa an hentoù da neuze, pegen ponner ar marc'h-houarn ! ha ne oa ket a zioudennerioù c'hoazh !

Mard eo aes an dibr eta e ra vad ivez da walenn-gein ar marc'h-houarn en abeg d'an emzalch sonn en devez o troadikellat.

Hizi ne ra ar "marc'h-houarn" (anv-merk an ardivink) nemet 10 kg, graet ma 'z eo ar rodou, an troadikellar hag an diroudenner e dural gant Salmon, oberour brudet Plouc'ha, 6320 lur e vez gwerzhet evit ar mare gant Scan-Breizh, La Gras d'an Bas, 56140 Bohal.

Ur c'harr-levraoueg evit ar provañseg

Ar prouvenço-bus a-dreuz ar vro Un oberiantiz a galle an hini a vez e provañseg. Skignet fall ha dianav eo d'al lod brasañ eus ar Brovañsiz avat. Pal ar «Prouvenço Bus» eo kinnig an embannadurioù dre-holl.

Bat root e diwez 1991 ez eo kefridi ar «Prouvenço Bus» mont ha dont a-dreuz Provañs ha kinnig levrioù, kelouennoù, pladennoù ha kasadegoù video provañsek, da breñañ pe da ampreññ. Pevar devezh bep sizhun a vez gouestlet dic'hopr d'al labour-se gant an Aotrou hag an Itron Bonifaj ; hag i mont d'ar marc'hadoù, d'ar gouelioù hangounel, d'an diskuliadegoù sevenadurel, d'ar c'hendivizoù ... Foetañ a reont ar seizh departamant - ha traoniennoù Italia- a vez komzet provañseg enno, ha dreist-holl ar rannbarzh Provañs (PACA ar yoc'hstlenn barizian).

Kuzul Rannbarzh Provañs eo en deus paeet ar c'harr hag e zanzeadur. Fiziet eo bet en Union Provençalo - unvaniaz ur c'hant bennak a gevarzheoù provañsegour. Frejoù ar mont en-dro evit ar bloavezh kentañ a vez kemeret e karg gant ar C'huzul c'hoazh. E dibenn ar bloavezh avat e ranko ar Prouvenço Bus bezañ emren afez archant. Evit poent emañ war an hent mat !

Claude Bonifaj BP 81 - 9 rue du Pont-Vieux 06302 NICE

Relijion

- Sul 5 a viz Gouere, e Lokoal-Mendon Evit ar pevare gwech, e vo un deiz gouel bras e brezhoneg aozet gant Bagad Lokoal. Olerenn vrezhonek da 10e 30, dañsoù goude-se ha friko e l'lapal, betek ar festi-noz. Hanter-briz eo an devezh evit ar re a zeu gwisket e giz ar vro.

- Sul 26 a viz gouere e Plouneour Menez : Pardon Santez Anna, patronez Breizh, e abati Ar Releg da 10 eur. E brezhoneg penn-da-benn ; laz-kanañ Sant-Vazhe Montroulez a gemero perzh en olerenn-se.

D'ar 15 a viz Eost : da gelfer pardon bras Itron-Varia ar Releg e Plouneour Menez bepred e vo kanet, evel bep bloaz ar gousperoù e brezhoneg penn-da-benn goude merenn, war an tonioù "krampouezh gwirizh du" a-wechall, da lavarout eo war an tonioù kozh e latin anavezet dre holl e Breizh gwechall evit ar pardonioù bras.

- E Kistinid e vo lidet evit ar wech kentañ an Olerenn e brezhoneg e Pontul fetan an deiz-se ivez (Gouel ar sist).



Sonerezh

Telenn keltiek gant Anne Marie Jan

Goude bezañ bet ganet e 1970 e Roazon, e krog Anne Marie Jan gant an delenn e 1980. Mont a ra ur vadalenn saour gant e 1991, roet a-unvouez dezhi gant ur juri bamet gant hac'h ampartegzhi. Ne baouezo ket war-lerc'h da varnnañ prizioù, e kenstrivadegoù etrebroadel, an eil priz e kenstrivadeg bedel an delenn en Oriant, da skwer.

Delennet eo kement gant an tonioù hengounel hag an tonioù nevez savet, gant an delenn keltiek hag an delenn klasel, "brasoc'h ha romantoc'h", emazi. Senniñ a ra tonioù K. Nogués, D.Succari, Mancoati, pe he re zoken. Spared he sonerezh a zo fromus, glan ha diginkl an ton, ha pinvidik ar c'henson war an dro. Evit ar sonadegoù, pellgomz d'an niverenn-mañ : 99 31 94 84.

SKRIVIT E-BARZH BREMAÑ !

Kasit ho pennadoù, luc'hskeudennoù, pladennoù, kasadegoù, filmoù, bitrakoù, restachoù a-raok ar 25 a viz Eost 1992 !

Trugarez bras ha vakañsoù mat d'an holl !

TAOLENN

BREMAÑ niv. 130/131 miz Gouere/Eost 1992

Table of contents for page 30 with categories like Lizhiri, Maastricht, Pobluvrouzhiadeg Iwerzhon, etc.

Maketenn gant Lena Louam ha J. M. Roynard.

Skoazell gant Kristell Louam ha Claude Becam.

Difaziñ gant Olier ar Mogn, D. Jolivet H. Bihan.

Luc'hskeudennoù gant L'Avair, O.F. Louis Blouze, A.V.C. Lena Louam, Nadine Queiser, Noel Laine, Libe, M. Goldwater.

Pennadoù gant Joel Donnat, Alan Heusaff, Herve Kerran, Olier Kombod, M.K., Bernaz Kadoret, Hargareg, Herve Mahéo, Gwenael Caradec, Maodez al Lez, Eliena Riou, Loiz Bocoquet, Iwan Kadoret, Filip Ollio, T.G., Lena Louam, G.K.

Renerezh BREMAÑ : Lena Louam

Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re a sin anezho.

Lakañ ho mignoned da goumanañ e-pad ho vakañsoù !

180 lur ar bloaz nametken evit 250 pajennad keleier / Skoazell adalek 200 lur.

BREMAÑ, 8 ru Hoche, 35000 Roazon, BREZHI. Nnn CPPAP 62974 Moullet e ti moulañ B.I.P.

Statistikoù

Hervez an OMS (Aozadur Bedel ar Yec'hod) ne vez graet nemet 100 milion a fouzhadennoù bemdez war an douar-patatez-mañ, pa 'z eus kement ha 3 miliard 1/2 a dud en oad da c'hoañh, da embarañ, da seveniñ ar gread revel, markant.

Diwar ar 100 milion a goubladoù kenfouzherien n'eus nemet 0,5 % a ra evit kaout bugale. 99,5 % eta ne sonjont nemet orgediñ, diseblant ouzhi siviñgezh o ene.

Bez ez eus memes tra 3 miliard 300 milion a chom d'bec'hed (ha war yun) e keit-se. A-hervez ne vezont ket holl en ilizoù : lod zoken ne reont nemet gouz o zro da gemer perzh en ebatou. M.K.

Roc'h Tredudon 14 a viz Gouere

Pik nik
bras
ha
gouel

Kan-ha-diskan
Strollad nevez Tarzh
Biniou-bombard
Standoù
Prezegennoù



Evit ur ganol skinwel e Brezhoneg gant STOURM AR BREZHONEG